

BREZHONEG AR BREZEL

**pennadoù embannet
en Heure Bretonne
ha dibabet gant**

Anna ar BIHAN

HOR YEZH

123

BREZHONEG AR BREZEL

pennadoù embannet
en Heure Bretonne
ha dibabet gant
Anna ar BIHAN

HOR YEZH
123

Ar gazetenn L'HEURE BRETONNE a zo bet embannet e-pad ar brezel 40-44, pa oa Bro-C'hall dindan dalc'h Bro-Alamagn. O esper o doa lakaet ar re a skrive e-barzh en un Alamagn a adrofe da Vreizh he gwirioù. Un digarez e oa evito d'en em zieubiñ diouzh gwaskerezh Bro-C'hall.

Skrivet e oa e galleg dreist-holl. En e labour a vestroniezh (Roazhon, 1970) en deus Bertrand Frelaut studiet ar gazetenn-se.

En un darn vras eus an niverennoù ez eus bet d'an nebeutañ ur pennad-skrid e brezhoneg.

Dibabet 'm eus pennadoù 'zo, ha da heul e vint kavet. N'am eus ket dibabet kalz pennadoù politikel, daoust ma vije bet kentelius e meur a zoare studiañ ar menozioù a zisplegent. Klasket 'm eus dastum skridoù dezho un tamm talvoudegezh lennegel, anezho peurliesañ testennoù buhezek, hag o kontañ doareoù ar bobl.

Per DENEZ, a oan e skol gantañ, en deus roet din ar menoz da sevel al labour-mañ, ha kuzulioù ouzhpenn evit dont a-benn anezhañ.

Ouzhpenn em eus bet skoazell ha diskleriadurioù digant Per ar BIHAN, ma zad, Andrev LATIMIER, Gab ar MOAL, Job JAFFRE, Remont DELAPORTE, Andrev DANIEL, Youenn OLIER, Alan al LOUARN, An Itron ar MEE ha V. de BELLAING.

Trevell Bertrand FRELAUT a zo bet prizius din ivez.

O zrugarekaat a ran, an holl anezho.

Ouzhpenn-se, posubl eo bet din labourat e levraouegoù Roazhon hag an Naoned, war ar rummad kelaouennoù a oa eno.

Er gontela L'HEURE BRETONNE a so bet ...
191-192, pa oa Bro-O'hall ...
e dos ...
Yreish he ...
gwasere Bro-O'hall.

Skriver a oa e gallez dreist-holl. ...
(1919) ...

Er ...
ur ...

Bibaket 'a ...
eus ket ...
kantenn ...
Klasket 'a ...
negel, ...
raod ar ...

Per DENEZ, a ...
da ...
...

Amañ da heul ez embann HOP YEZH un diverradur eus labour
mestroniezh ANNA AR BIHAN. Kinniget eo bet al labour mestro-
niezh e skol-veur Breizh-Uhel, Roazhon, e 1977. Degemeret eo
bet gant an AoA. L. Fleuriot, kelenner ha Per Denez. Ranket
hon eus lezel a-gostez, evit an embannadur-mañ, an darn vras-
sañ eus barnadennoù hag evezhiadennoù Anna ar Bihan.

1902, 1903

- Nov. 1 - 14 a viz Gwengal & Gwengal
- Nov. 7 - 21 a viz Gwengal & Gwengal
- Nov. 7 - 22 a viz Gwengal & Gwengal
- Nov. 8 - 4 a viz Gwengal & Gwengal
- Nov. 8 - 11 a viz Gwengal & Gwengal
- Nov. 8 - 18 a viz Gwengal & Gwengal
- Nov. 7 - 25 a viz Gwengal & Gwengal
- Nov. 8 - 1 a viz Gwengal & Gwengal

ROLL AR PENNADOU BREZHONEK

EMBANNET EN

" HEURE BRETONNE "

- Nov. 10 - 25 a viz Gwengal & Gwengal
- Nov. 11 - 22 " HEURE BRETONNE "
- Nov. 12 - 28 a viz Gwengal & Gwengal
- Nov. 13 - 5 a viz Gwengal & Gwengal
- Nov. 14 - 11 a viz Gwengal & Gwengal
- Nov. 15 - 20 a viz Gwengal & Gwengal
- Nov. 16 - 27 a viz Gwengal & Gwengal
- Nov. 17 - 3 a viz Gwengal & Gwengal
- Nov. 18 - 10 a viz Gwengal & Gwengal
- Nov. 19 - 17 a viz Gwengal & Gwengal
- Nov. 20 - 23 a viz Gwengal & Gwengal
- Nov. 21 - 30 a viz Gwengal & Gwengal

BLOAZ 1940

- Niv. 1 - 14 a viz Gouere : netra
- Niv. 2 - 21 a viz Gouere : *Dihun Breih*, Serjant Gouziern
- Niv. 3 - 28 a viz Gouere : *Gwerz ar Brezel*
- Niv. 4 - 4 a viz Eost : *Diouganou deut da wir*, prezegenn A. Geffroy e Pariz.
- Niv. 5 - 11 a viz Eost : *Paotred vrac ar gambr*
- Niv. 6 - 18 a viz Eost : *Edan jav er hreiste*, Serjant Gouziern.
- Niv. 7 - 25 a viz Eost : *C'houiled an avalou-douar*
- Niv. 8 - 1 a viz Gwengolo : *Kentelioù ar brezel 1939-1940*, Kerlann.
- Niv. 9 - 8 a viz Gwengolo : *Yun ar C'halvez*, Yann Vriant.
- Niv. 10 - 15 a viz Gwengolo : *Visant Bendix a oa eur Breton*, Gwaz Treger.
- Niv. 11 - 22 a viz Gwengolo : *Da yec'hed Breiz*, ar Yeodet.
- Niv. 12 - 29 a viz Gwengolo : *Ar skol evit ar Vrezoned*, R.H.
- Niv. 13 - 6 a viz Here : netra
- Niv. 14 - 13 a viz Here : *Kanenn-veur ar pobloù gwasket*, Roparz Hemon.
- Niv. 15 - 20 a viz Here : netra
- Niv. 16 - 27 a viz Here : netra
- Niv. 17 - 3 a viz Du : *Abadenn Namsos (da heulia)*, Y. Mab Koig
- Niv. 18 - 10 a viz Du : *Abadenn Namsos (heuilh)*
- Niv. 19 - 17 a viz Du : netra
- Niv. 20 - 23 a viz Du : netra
- Niv. 21 - 30 a viz Du : *Dirak an disantroù*, Abeozen
Talvoudegez ar vrezonegerien, Y.D.
Piou er penn, Yann Kerdiles
Radio brezonek e Roazon a-benn ar fin
evit ur milion hanter a vrezonegerien, Tin Gariou
Les mannequins articulés enep les Dégoû-
dis de la onzième, C'houero-briz.

- Mers-el-Kebir, bered ar Vretoned, Tin
Gariou.
Gwalarn bepred, Gwilhermig
- Niv. 22 - 7 a viz Kerzu : Abadenn Namsos (heuilh)
Breiz nevez o tiwana, Karevreiz
- Niv. 23 - 14 a viz Kerzu : Fé ha Ieh, Boeh er Skoru
Er gazetenneu brehonek, Gurval
Marù el labourer, Leiham
Damani er hreiste, S. Gouziern
En Alamaned hag er brehoneg, M.B.
Kourted
- Niv. 24 - 21 a viz Kerzu : Kan an Eosterien
- Niv. 25 - 28 a viz Kerzu : Abadenn Namsos (heuilh)
Termaji war ar blasenn, J. Riou
An Anglichenn a zo heretiked, Sezni

BLOAZ 1941

- Niv. 26 - 4 a viz Genver : netra
- Niv. 27 - 11 a viz Genver : Peizanted Breih, Boeh er Skoru
Lennegeh, El lennour
En "Noz ha de", Er Piskour
- Niv. 28 - 18 a viz Genver : netra
- Niv. 29 - 25 a viz Genver : Eñvorennoù diwar-benn Jakez Riou,
Abeozen
Nomenoe-oe ! Jakez Riou
- Niv. 30 - 1 a viz C'hwevrer : netra
- Niv. 31 - 8 a viz C'hwevrer : Perak derhel d'er brehoneg, Gurval
Ur person fur, Mateh er person
Breih er vro peur ! Job Gouron
Er brehoneg er skolieu, Boeh er
Skorù.
D'émen éh é hon argant, E. er Rou-
zig.
Koig.
Abadenn Namsos (heuilh), Y. Mab
- Niv. 32 - 15 a viz C'hwevrer : netra

- Niv. 33 - 22 a viz C'hwevrer : - Amañ Radio-Londrez, Sezni
- Lec'h ar brezoneg, Iwan Dreger
- Un aluzen gwiniz da baotred ar c'hreisteiz, Tin
Gariou.
- Niv. 34 - 1 a viz Meurzh : An teuz, Aberwan
- Niv. 35 - 8 a viz Meurzh : Er homédi, L. er Rouzig
- Harz d'er ridiourion-vro, Gurval
- Maru Minour Kergo, M. en Uvel
- Niv. 36 - 15 a viz Meurzh : netra
- Niv. 37 - 22 a viz Meurzh : - Eur martolod brudet eus hor Bro,
Duguay-Trouin (da heulia)
- Setu bremañ daou c'hant vloaz e tegoueze ar breizad
Blanchet eus Enez Iwerzon gant un dousenn avalou-douar
da hada, Tin-Gariou.
- Micher ar galoherien e Rosporden
- Niv. 38 - 29 a viz Meurzh : netra
- Niv. 39 - 5 a viz Ebrel : - Eur martolod brudet eus hor Bro,
Duguay-Trouin (da heulia)
- En eoul avaleu-douar pe Dorifora, L. er Rouzig
- Leandi Kermaria, Boeh er Skorù
- Niv. 40 - 12 a viz Ebrel : netra
- Niv. 41 - 19 a viz Ebrel : Eur martolod brudet eus hor Bro,
Duguay-Trouin
- Gloazet eo bet Nomenoe-oe !
- Eur slogan da zistrujañ "netra evit ar brezoneg,
keit ha ma vo an Alamaned amañ", Tin Gariou.
- Louvois-en-Champagne, Tin Gariou
- Niv. 42 - 26 a viz Ebrel : netra
- Niv. 43 - 3 a viz Mae : En dud flav, L. er Rouzig
- Dihunerion hor bro : penaos e varuas Markiz er
Pontkalleg, Rene la Borderie
Pesked dour-dous, L. er Rouzig
- Komprennet mat ! M.B. Kourted
- Arhant euit Marianna, M. en Uvel
- Niv. 44 - 10 a viz Mae : netra
- Niv. 45 - 17 a viz Mae : Erwan, Youenn, Eozen, T.G.
- Makbez, pez-c'hoari Gwilherm Shakespeare, lakaet e
brehoneg gant R. Hemon.

- Sant Erwan a Vro-Gernev
 - 10 Mae 1940, eun tu bennak e Bro-C'hall, Tin Gariou
 - Sant Erwan a oa "otonomist", L. an H.
- Niv. 46 - 24 a viz Mae : netra
- Niv. 47 - 31 a viz Mae : El lion hag er blei, J. Buleon
- En Istoer, Boéh er Skorù
 - Geuier Vichy, M. B. Kourted
 - Adal d'er labour, L. er Rouzig
- Niv. 48 - 7 a viz Mezheven : netra
- Niv. 49 - 14 a viz Mezheven : netra
- Niv. 50 - 21 a viz Mezheven : - Emgann ar brezoneg, Tin Gariou
- Hoc'h goue Plouneour Lannvern, J.M. Nedeleg
 - War zismantrou Brest, Sezni
- Niv. 51 - 28 a viz Mezheven : Ur gentel d'ar re vras, Reun Argant
- Ur vro hepken, hon hani, L. er Rouzig
 - Kaol-pomm en Oriant ha Sene, M.B. Kourted
 - Ardeu Pier Leathtrenk, tad-koh me zad-koh, M. en Uvel
- Niv. 52 - 5 a viz Gouere : Deuet eo an trec'h kenta ganeomp : adsavet e vo Breiz en he fez. Roazon a vo kerbenn. R. Delaporte.
- Niv. 53 - 12 a viz Gouere : Ar groug d'al laeron, Tin Gariou
- Emgann ar brezoneg, Tin Gariou
 - Troveni 1941. Salud da Sant Ronan, Ronan Askoed
 - Hor broig, Fafich Poullaoueg
 - Ar c'hloc'h aour Tin Gariou
 - Ar Roue Gradlon en Iz Be, Reun Argant
 - Ag ar brehoneg unanet d'ar brehoneg unvan, Jos P.
 - Ar c'hloc'h aour, Tin Gariou
 - Nitra de houlen, L. er Rouzig
 - Lennegez keltiek ha lennegez germanek,
 - Ar besketerezh, P. Gflfifl
 - Ardeu Pier Leathtrenk, M. en Uvel
- Niv. 55 - 26 a viz Gouere : - Goarnet hou Pretoned, Jos Penpoul
- Niv. 56 - 2 a viz Eost : Graet e vo ! Jos P.
- Niv. 57 - 9 a viz Eost : Eun tarz en noz, Yann Kerdiles
- Priz er chistr, M.B. Kourted
- Istoer Breih er skolieù, Boéh er Skorù
 - Ne zistaolomp ket, L. er Rouzig
 - Péhar, jav Pier Leathtenk, M. en Uvel
- Niv. 58 - 16 a viz Eost : - Goude pardonioù Hanter-Eost, eur pardoner
- Bro ar sivi, Plougastell, Sezni
 - Kato koz war garreg an tan, Tin Gariou
 - Hor yezig Fafich Poullaoueg
 - Maro Trant. Kontadenn eus enez Eusa
 - Ar merc'hed o zreid triolor, T. G.
 - Gwechall goz, kennebeut, ne veze ket druz ar peuri Reun.
- Niv. 59 - 23 a viz Eost : Ne vouhemp ket ! Jos P.
- Niv. 60 - 30 a viz Eost : Ul liher, Jos P.
- Niv. 61 - 6 a viz Gwengolo : Greomp un ehan, Jos P.
- Niv. 62 - 13 a viz Gwengolo : Evit ar wech kenta, Prezegenn Ch. Gaonac'h.
- Niv. 63 - 20 a viz Gwengolo : Leoniz ha Kerneviz, tud leal ha feal, M.J. le Bec
- Eul leonad e Bro-Gwened, Sezni
 - Menez-Mikael Mor, Sezni
 - Nao leo evit eur skoed Levriou pe al "laer" brezhoneg Tin Gariou
 - Itron Varia Garmez, Youenn Drezen
- Niv. 64 - 27 a viz Gwengolo : Lizer eur paotr yaouank "hardehans e vank d'ein"
- Nerh ar bedenn, L. er Rouzig
 - Ki Pier Leathtrenk, M. en Uvel
 - En avaleù-mir, M.B. Kourted
- Niv. 65 - 4 a viz Here : N'eur vale dre Vreiz, C. G.
- Niv. 66 - 11 a viz Here : Nag eun dristez ! Jos T.
- Den gaouank va bro, Kerlann
- Niv. 67 - 18 a viz Here : En-dro d'ar Framm Keltiek, Tin Gariou
- Niv. 68 - 25 a viz Here : -Eur sizun geltiek e Roazon, Tin Gariou. - Me a zesk lenn, Tin Gariou
- An archerien hag ar marc'had kuz, Tin Gariou
 - Plijadur 'vez er sinema ! Factr Gouezeg
 - Hor bediq, Fafich Poullaoueg

- Niv. 69 - 1 a viz Du : - Trec'h an unvaniezh, Tin Gariou
 - Dorn oh dorn, L. er Rouzig
 - Skrivagnerion hor Bro, J.M. er Joubius
 - Gad Pier Leathtrenk, M.V. an Uvel
 - Torgenn Gador, Aoter Breizh Nevez, Kerlann
- Niv. 70 - 8 a viz Du : - Breizh nevez ne vo ket ganti klaz al
 loued, Kerlann
 - Dominus Vobiskom pe al latin e-touez ar brezhoneg,
 Ar Masikod
- Niv. 71 - 15 a viz Du : - Treu neué é Breih, Jos P.
- Niv. 72 - 22 a viz Du : - Terri ar gwall pleaou, Liorzer
 - Deomp d'ar skol noz, Tin Gariou
 - Ici Rennes Bretagne. Amañ Roazon Breiz, Sezni
 - Hiraec d'am c'harantez, Iseult Tramor
 - Skol Beg Avel, Fañch Poullaoueg
- Niv. 73 - 29 a viz Du : - Brezoneg e pep lec'h, Liorzer
- Niv. 74 - 6 a viz Kerzu : - Da vrezonegerien Bro-Naoned, Liorzer
 - Labour gouianv, L. er Rouzig
 - Klujiri Pier Leathtrenk, M. en Uvel
- Niv. 75 - 13 a viz Kerzu : - Breiz d'ar Vretoned, Sezni
- Niv. 76 - 20 a viz Kerzu : - Breiz hag an douristed pe pep hini
 en e gorn, R. an H.
- Niv. 77 - 27 a viz Kerzu : - Skol al Louarn, Tin Gariou

BLOAZ 1942

- Niv. 78 - 10 a viz Genver : - Tamall a hramb, L. er Rouzig
- Niv. 79 - 17 a viz Genver : - Ar bloaz nevez, Tin Gariou
- Niv. 80 - 24 a viz Genver : - Jakez Riou, Abeczen
- Niv. 81 - 31 a viz Genver : - C'hoari ar saez, Tin Gariou
- Niv. 82 - 7 a viz C'hwevrer : - Bro-Frañs hag... ar C'hallaoued,
 Ar pilhaouer
- Niv. 83 - 14 a viz C'hwevrer : - Bro-Frañs eo a zo eur vro baour,
 Sezni
- Niv. 84 - 21 a viz C'hwevrer : - Er re gablus, L. er Rouzig
- Niv. 85 - 28 a viz C'hwevrer : - Scharnhorst. Gneisenau, h.a.
 pe an dud dall, Tin Gariou
- Niv. 86 - 7 a viz Meurzh : - Statuioù, ha tud veur, Tin Gariou
- Niv. 87 - 14 a viz Meurzh : - Mein pe arem ? Tin Gariou
- Niv. 88 - 21 a viz Meurzh : - Trema er Gerteri, L. er Rouzig
- Niv. 89 - 28 a viz Meurzh : - Yann Sohier, Tin Gariou
- Niv. 90 - 4 a viz Ebrel : - An dlead kenta, Iwan Dreger
- Niv. 91 - 11 a viz Ebrel : - Iwerzon hag he skrivagnerien, Tin
 Gariou
- Niv. 92 - 18 a viz Ebrel : - Diwar-benn Kendalc'h Sant Brieg,
 Yann Kerdiles.
 - Korn an amguz pe blanedenn "Strollad Broadel Breiz"
 Rozenn Morvan
 - Gant beg va c'hrog,
 Ar pilhaouer
- Niv. 93 - 25 a viz Ebrel : - Soudarded omp ! Tin Gariou
- Niv. 94 - 2 a viz Mae : - Bout Prest, L. er Rouzig
- Niv. 95 - 9 a viz Mae : - Micheriou bihan, Tin Gariou
- Niv. 96 - 16 a viz Mae : - En Naoned, gant Kendalc'h ar Framm
 Keltiek
- Niv. 97 - 23 a viz Mae : - Ar prefed, an sotrou maer hag an ed,
 Saik

- Niv. 98 - 30 a viz Mae : - Arabat é gortoz, L. er Rouzig
 Niv. 99 - 6 a viz Mezheven : - Kaout bugale, Tin Gariou
 Niv. 100 - 13 a viz Mezheven : -Gouzout senti, Tin Gariou
 Niv. 101 - 20 a viz Mezheven : - Emaint o tont pe lonkerien
 tousegi, Tin Gariou
 Niv. 102 - 27 a viz Mezheven : - Amzer 'zo ! Tin Gariou
 Niv. 103 - 4 a viz Gouere : netra
 Niv. 104 - 11 a viz Gouere : Koumanant eost, Tin Gariou
 Niv. 105 - 18 a viz Gouere : - Setu dihunet "O, lo, le !" T. Gariou
 - Romantou "pobl" ? Erwan Danteg
 Niv. 106 - 25 a viz Gouere : Bretoned, tud va bro, K.
 Niv. 107 - 1 a viz Eost : - Emaint o vont, kentoc'h... Arvoriad
 Niv. 108 - 8 a viz Eost : - Nann ! Tin Gariou
 Niv. 109 - 15 a viz Eost : - Diu gentel de bredérien ar nehe,
 E. er Rouzig.
 Niv. 110 - 22 a viz Eost : - Torfed an Arc'hoazerien, Ar
 Pilhaouer.
 Niv. 111 - 29 a viz Eost : - Spered kristen pe farserez ?
 Ar Barz
 Niv. 112 - 5 a viz Gwengolo : - Emskiant pobl ha politikerez,
 Fañch Erard.
 Niv. 113 - 12 a viz Gwengolo : - Nann, Aotrou Maurras ! tennet
 eus prezegenn Ch. Gaonac'h.
 Niv. 114 - 19 a viz Gwengolo : - Dihourzamb ! L. er Rouzig.
 Niv. 115 - 26 a viz Gwengolo : - Yann Saoz ha Yann Ki, Arvoriad.
 Niv. 116 - 3 a viz Here : - Skol vrezonek hor bugale, T. G.
 Niv. 117 - 10 a viz Here : - Oranjez hep tikedoù ha tikedoù hep
 oranjez, ar Pilhaouer.
 Niv. 118 - 17 a viz Here : -Lodenn er merhed, L. er Rouzig.
 Niv. 119 - 24 a viz Here : - Amañ Roazon Breiz ! Met ne glever ket,
 Tin Gariou.
 Niv. 120 - 31 a viz Here : - An Holl-Sent, hag an Anaon hag ar
 Vuhez, Tin Gariou.

- Niv. 121 - 7 a viz Du : - Dizurz Bro-C'hall hag ar Peoc'h evit
 Breiz, Kolaz.
 Niv. 122 - 14 a viz Du : - Diollamb ! L. er Rouzig.
 Niv. 123 - 21 a viz Du : - An Inizi o vont da goll, Tin Gariou.
 Niv. 124 - 28 a viz Du : - An Inizi o vont da goll, Tin Gariou.
 Niv. 125 - 5 a viz Kerzu : - An Darvoudou ha Poent Koan pe Kaout
 an treid war an douar, Tin Gariou
 Niv. 126 - 11 a viz Kerzu : - Ar Post o klask trouz ouz ar bre-
 zoneg, Tin Gariou.
 Niv. 127 - 18 a viz Kerzu : - Breuder enep de vreuder, L. er
 Rouzig.
 Niv. 128 - 25 a viz Kerzu : - An noz o tigrski. Gwelet a vo
 sklaer adarre.

1943

- Niv. 129 - 8 a viz Genver : - "Soù !" "Dac'halm !" pe sevel eur roll-labour.
- Niv. 130 - 15 a viz Genver : - Kantikou brezonek, Ar C'hloareg.
- Niv. 131 - 22 a viz Genver : - Harz er bleidi ! L. er Rouzig.
- Niv. 132 - 29 a viz Genver : - Vichy, Kerbenn Bro-C'hall, Ar Pilhaouer.
- Niv. 133 - 5 a viz C'hwevrer : - Get piñ en treh ? Boéñ er Skorù.
- Ar brezoneg hag al levenez, Tin Gariou.
- Buoc'h Pipi Taleg, Erwan Danteg.
- Niv. 134 - 12 a viz C'hwevrer : - Er skol vrezonek, Tin Gariou.
- Niv. 135 - 19 a viz C'hwevrer : - Gribouilh, Tin Gariou.
- Niv. 136 - 26 a viz C'hwevrer : - Kréidiñ ér réral ?...
L. er Rouzig.
- Niv. 137 - 5 a viz Meurzh : An Oriant ha tan-gwall ar Saozon,
Tin Gariou.
- Pipi Taleg hag ar gemenez, Erwan Danteg
- Niv. 138 - 14 a viz Meurzh : Brestiz a-enep an Anglichen, Sezni.
- Niv. 139 - 21 a viz Meurzh : - Dirak dismantrou Roazon, Tin Gariou.
- Niv. 140 - 28 a viz Meurzh : - Trec'h ar vuhez, Tin Gariou.
- Niv. 141 - 4 a viz Ebrel : - Miramb hor gouenn digej, L. er Rouzig.
- Evit kelo-se ! Erwan Danteg.
- Niv. 142 - 11 a viz Ebrel : netra.
- Niv. 143 - 18 a viz Ebrel : Ar brezoneg en aferiou, Egile pe an Alvokad brezoneg.
- Niv. 144 - 25 a viz Ebrel : - Dasorc'hidigezh, Aberwan.
- Niv. 145 - 2 a viz Mae : - Frankizenn, Tin Gariou
- Kaoz ar c'hog hag ar gwiader, Erwan Danteg
- Sacha Guity, Tin Gariou.
- Niv. 146 - 9 a viz Mae : - Bokedoù Mae, Tin Gariou.
- Niv. 147 - 16 a viz Mae : - Charlantiñ ar Ministr, Bara hor genou ha traoùigoù all, Tin Gariou.

- Niv. 148 - 23 a viz Mae : - Vichy, kêrbenn ar brezhoneg, Tin Gariou.
- Niv. 149 - 30 a viz Mae : - Ar Framm Keltiek, Tin Gariou
- An diaoul, Tin Gariou
- Gwinardant an Ao. Person, Erwan Danteg.
- Niv. 150 - 6 a viz Mezheven : - Traoalñ a amoédaj ! L. er Rouzig.
- Niv. 151 - 13 a viz Mezheven : - Goude bara hor genou, jistr hor c'horzailhenn, Tin Gariou.
- Niv. 152 - 20 a viz Mezheven : Radio-Roazhon bemdez, Tin Gariou.
- Niv. 153 - 27 a viz Mezheven : - Tri bloaz 'zo (24 Mezheven 1940)
Tin Gariou.
- Niv. 154 - 4 a viz Gouere : Bara er Peizant, L. er Rouzig.
- Niv. 155 - 11 a viz Gouere : - Un deiz-ha-bloaz da vokediñ !
Peurunvanidigezh ar brezhoneg skrivet.
- Niv. 156 - 18 a viz Gouere : - Radio-Yaouankiz Tin Gariou.
- Niv. 157 - 25 a viz Gouere : - 14 Juillet ha 28 Gouere, Y. Drezen
- Santez Marianne, An Divroad
- Badaouiñ ha bezañ diwar zour, Tin Gariou
- Ar felpenn saosison, E. Danteg.
- Niv. 158 - 1 a viz Eost : - D'el labour tud iaouank, L. er Rouzig.
- Niv. 159 - 8 a viz Eost : - Furchadegoù e Karnag, Tin Gariou.
- Niv. 160 - 15 a viz Eost : - Un den hag e vro, Tin Gariou.
- Niv. 161 - 22 a viz Eost : - Santez Anna ar brezhoneg, Tin Gariou
- Ar freilh hag an dornerez, Tin Gariou.
- Niv. 162 - 29 a viz Eost : - Ur gêr diarbenn brehoneg Guéned,
L. er Rouzig.
- Niv. 163 - 5 a viz Gwengolo : Mouezh an Divroad, an Divroad.
- Komzoù ar prizoniad, Tin Gariou.
- Niv. 164 - 12 a viz Gwengolo : - An Naoned e Breizh, Tin Gariou.
- Niv. 165 - 19 a viz Gwengolo : - Diwallit ! L. er Rouzig
- Freilh, kegel ha binvioù all diamzeret marteze,
nemet bev... Mésaer Roc'h-Gudren, P.c.c. T. Gariou
- Pipi Taleg ha Yann al Laorañs, Erwan Danteg.

- Niv. 166 - 26 a viz Gwengolo : - *Kenvreuriezh ar brezhoneg*, Tin Gariou.
- Niv. 167 - 3 a viz Here : - *An Amerik hag he nijerien*, T. Gariou
- *Diwar-benn Bécassine*, Erwan Danteg.
- Niv. 168 - 10 a viz Here : - *Normandiz ha Northmen*, respont da glemm un *Normand*, Tin Gariou.
- Niv. 169 - 17 a viz Here : - *Ar galleg chimik*, Merjareg
- *Ar gevar en ho servij*, An Divroad
- *Ar gouriz-plouz*, Eostig Kerineg.
- Niv. 170 - 24 a viz Here : - *N'ankounac'homp ket !* M.B. Kourted.
- Niv. 171 - 31 a viz Here : - *Respont peizanted an Oriant d'un tamaller*, Tin Gariou
- *E Pariz ne vo ket diouer a win*, an Divroad.
- Niv. 172 - 7 a viz Du : - *Evit c'hwec'h ugentvet bloaz an tren*, Tin Gariou.
- Niv. 173 - 14 a viz Du : - *En em glevomp un tammig !* Tin Gariou.
- Niv. 174 - 21 a viz Du : - *Brezel ar Vretoned*, S. Gouzhiern.
- Niv. 175 - 28 a viz Du : - *Na kaer e oa bevañ !* Tin Gariou
- *Mouezh an Divroad*, an Divroad.
- Niv. 176 - 5 a viz Kerzu : - *Arc'hant da c'hounit gant ar brezhoneg*, Tin Gariou.
- Niv. 177 - 12 a viz Kerzu : - *Arc'hant da c'hounit ? ... Met Ya !* Tin Gariou.
- Niv. 178 - 19 a viz Kerzu : - *An Aotrou Yann Vari Perrot*, Tin Gariou.
- Niv. 179 - 26 a viz Kerzu : - *Bugelig ar c'hraou ha Deroù mat ar bloaz nevez*, Tin Gariou
- *An Aotrou Yann Vari Perrot hag al levrioù brezhonek*,

1944

- Niv. 180 - 9 a viz Genver : - *Peb unan e labour*, S. Gouzhiern.
- Niv. 181 - 16 a viz Genver : - *Arc'hoazh*, Tin Gariou.
- Niv. 182 - 23 a viz Genver : - *Nijerien veur Bro-Vreizh*, Tin Gariou.
- Niv. 183 - 30 a viz Genver : - *Un den dreist : La Tour d'Auvergne*, Tin Gariou.
- Niv. 184 - 6 a viz C'hwevrer : - *Nijerien veur Bro-Vreizh : Du Plessis de Grenedan*, Tin Gariou.
- Niv. 185 - 13 a viz C'hwevrer : - *Nijerien veur Bro-Vreizh : Maoris Nogues*, Tin Gariou.
- Niv. 186 - 20 a viz C'hwevrer : - *Teofil Malo Korret lesanvet La Tour d'Auvergne*.
- Niv. 187 - 27 a viz C'hwevrer : - *Hon nijerien veur : Jozeb-Mari ar Brix*.
- Niv. 188 - 5 a viz Meurzh : *Ened ha meurlarjez*, Tin Gariou.
- Niv. 189 - 12 a viz Meurzh : - *Gall ? Forzh piou !* Tin Gariou.
- Niv. 190 - 19 a viz Meurzh : - *Amañ, Roazhon Breizh !* T. Gariou.
- Niv. 191 - 26 a viz Meurzh : - *Iwerzhon sonn*, Tin Gariou.
- Niv. 192 - 2 a viz Ebrel : *Marv o zri d'an nevez-amzer*, Tin Gariou.
- Niv. 193 - 9 a viz Ebrel : *Hag hor bro-ni ?* S. Gouzhiern.
- Niv. 194 - 16 a viz Ebrel : - *Frañsez "paourig" Asiz*, Tin Gariou.
- Niv. 195 - 23 a viz Ebrel : - *Divunadennoù, krennlavarioù, doareoù-komz*, h.a..
- Niv. 196 - 30 a viz Ebrel : - *Evit ma c'hello an holl lenn hol levrioù kaer*, Tin Gariou.
- Niv. 197 - 7 a viz Mae : - *Bugale ar skolioù hag ar brezhoneg*, Tin Gariou.
- Niv. 198 - 14 a viz Mae : - *Ar brezhoneg e skolioù Gwened*, S. Gouzhiern.
- Niv. 199 - 21 a viz Mae : - *Al levrioù brezhonek adarre*, Tin Gariou.

Niv. 200 - 28 a viz Mae : netra.

Niv. 201 - 4 a viz Mezheven : - Aozañ an amzer-da-zont, Tin Gariou.

Niv. 202 - 11 a viz Mezheven : - Hol lodenn-ni, S. Gouzhiern.

Niv. 203 -

Niv. 204 - 30 a viz Gouere : netra.

Renket eo anvioù ar skrivagnerien pe resisoc'h an anvioù pluenn hervez urzh al lizherenneg.

Kavet e vo da heul an anvioù gwir. Daoust din bezañ furchet kalz ha bezañ bet kalz sikour, n'eus ket bet kavet kalz anezho.

An niverennoù a zo re ar gelaouenn e-lec'h m'en deus skrivet pep hini ; ha diskouez a reont neuze pegement en deus pep skrivagner skrivet en "Heure Bretonne".

Anvioù ar roll-mañ a zo re saverien ar pennadoù brasañ. Pa oa moulet ur bajenn a-bezh e brezhoneg, e veze warni alies pennadoùigoù, notennoù, istorioù berr ha ne oant ket sinet peurvuiañ. Koulskoude e kaver c'hoazh ar sinaturioù-mañ e traoñ ur skrid berr bennak : P. er Gourenour, I.M. Heneu, Jakez Konan (an anv-se a zo unan gwir), Ch. Lambel, Moruent, Skrign, E.L., M. ar B.

A-hend-all pennadoù hir ha talvoudus 'zo n'eus war o lerc'h sinatur ebet. Da skouer, ar pennadoù o kontañ istor Duguay-Trouin, a gaver war un toullad niverennoù (37, 39, 41).

A

ABEOZEN - Fañch Elies - Niv. : 21, 29, 80.
ABERNAN - Victor Nouel de Kerangue, eus Tredarzeg - Niv. : 34, 144.
REUN ARGANT - Yeun ar Go - Niv. : 51, 53.
ARVORIAD - Niv. : 107, 115.
RONAN ASKOED - Yann Ezel - Niv. : 53.

B

AR BARZ - Niv. : 110.
M.J. LE BEC - Niv. : 63.
BLEU BENAL - Pierre le Sausse - Niv. : 6.
BOEH ER SKORU - Niv. : 23, 27, 31, 47, 57, 133.
RENE LA BORDERIE - Niv. : 43.
J. BULEON - Niv. : 47.

C'H

AR C'HERNEVAD - Niv. : 45.
 AR C'HLOAREG - Niv. : 130.
 C'HOUEIRO BRIZ - Niv. : 21.

D

Y.D. - Youenn Drezen moarvat (s.o. Tin Gariou) - Niv. : 21.
 ERWAN DANTEG - Gwilhom Berthou - Niv. : 105, 133, 137, 144, 149?
 165.
 R. DELAPORTE - R. Delaporte - Niv. : 52.
 AN DIVROAD - Niv. : 157, 163, 166, 169, 171, 175.
 IWAN DREGER - Niv. : 33, 90.
 YOUENN DREZEN - Y. Drezen (s.o. Tin Gariou) - Niv. : 63, 157.

E

EGILE (pe an Alvokad brezoneg) - Loeiz ar Floc'h moarvat - Niv. :
 143.
 EOSTIG KERINEG - Niv. : 169.
 FANCH ERARD - Niv. : 112.

G

C.G. - Charles Gaonac'h moarvat - Niv. : 65.
 CH. GAONAC'H - Charles Gaonac'h eus Roazhon - Niv. : 62, 113.
 TIN GARIOU - Youenn Drezen - Niv. : 21, 41 (2), 45 (2), 50, 53 (3),
 54, 58, 63, 67, 68 (3), 69, 72, 77, 79, 81, 85, 86,
 87, 89, 91, 93, 95, 96, 99, 100, 101, 102, 104, 105,
 108, 116, 119, 120, 123, 124, 125, 126, 128, 129,
 133, 134, 135, 137, 139, 140, 145 (4), 146, 147, 148,
 149 (2), 151, 161, 165, 176, 177, 178, 179 (2), 181,
 182, 183, 184, 185, 187, 188, 189, 190, 191, 192, 194,
 195, 196, 197, 199, 201.
 ANDREV GEFFROY - Andrev Geffroy - Niv. : 4.
 GFLFIFL - Niv. : 54.
 PAOTR GOUZEG - Yeun ar Go, eus Gouezeg - Niv. : 68.
 JOB GOURON - Niv. : 31.
 S. GOUZIERN (pe GOUZHIERN) - Niv. : 2, 6, 23, 174, 180, 193, 198,
 202.
 GURVAL - Niv. : 23, 31, 35.
 GWAZ TREGER - Niv. : 10.
 GUILHERMIG - Ar Joubius - Niv. : 21.

H

L. AN H. - Niv. : 45. -
 R. AN H. - R. le Hir, eus Landerne - Niv. : 76.
 R. H. - Roparz Hemon - Loeiz Paol Nemo - Niv. : 12.
 ROPARZ HEMON - Loeiz Paol Nemo - Lesanvioù all : Pendaran, Ronan
 Penanpark - Niv. : 14, 45.

K

K. - Niv. : 106.
 P. K. - Niv. : 23.
 KAREVREIZ - Niv. : 22.
 YANN Kerdiles - Fañch Elies (s.o. Abeozen'ivez) - Niv. : 21,
 57, 92.
 KERLANN - Yann Delalande, skolaer - Niv. : 8, 66, 69, 70.
 KOLAZ - Niv. : 121.
 KONAN - Niv. : 35.
 JAKEZ KONAN - Jakez Konan - Niv. : 58.
 M.B. KOURTED - Niv. : 23, 25, 43, 47, 51, 57, 64, 170.

L

LEIHAM - Niv. : 23.
 AL LENNOUR - Niv. : 27.
 LIORZHER - Niv. : 72, 73, 74.

M

Y. MAB KOIG - J.M. Guerchet - Lesanv all : Yann Vari Kerwerc'hez -
 Niv. : 17, 18, 22, 31.
 TAD MALGORN - Niv. : 58.
 AR MASIKOD - Niv. : 70.
 MATEH ER PERSON - Niv. : 31.
 MERJAREG - Jul Konan - Niv. : 169.
 ROZENN MORVAN - Niv. : 92.

N

J.M. NEDELEG - Niv. : 50.

P

UR PAOTR EUS BRO GERNE - Niv. : 3.
 UR PARDONER - Niv. : 58.
 JOS PENPOUL - Joseph Jaffre - Niv. : 54, 55, 56, 59, 60, 61, 71.
 AR PILHAOUER - Niv. : 132, 82, 92, 111, 117.
 ER PISKOUR - Niv. : 27.
 FANCH POULLAOUEG - Anton Jezequel, eus Gwipavaz - Niv. : 53, 58, 68, 72.

R

REUN - Niv. : 58.
 JAKEZ RIOU - Jakez Riou - Niv. : 25.
 L. ER ROUZIG - Loeiz Herrieu - Niv. : 31, 35, 43 (2), 47, 51, 54, 57, 64, 69, 74, 84, 88, 94, 98, 109, 114, 118, 122, 127, 131, 136, 141, 150, 154, 158, 162, 165.

S

SAIK - Niv. : 97.
 SEZNI - Paol Le Rest - Niv. : 33, 50, 58, 63 (2), 72, 75, 83, 138.

T U

JOS T. - Niv. : 66.
 ISEULT TREMOR - Niv. : 72.
 TUDYR - Niv. : 186.
 M. EN UVEL - Niv. : 35, 43, 51, 54, 57, 64, 69, 74.

V Y

YANN VRIANT - Yeun ar Go - Niv. : 9.
 AR YEODET - Auguste Boscher - Niv. : 11.

Ar skrivagnerien o deus savet ar muiañ a bennadoù a zo TIN GARIOU (101 pennad) ha L. er ROUZIG (30), hemañ o skrivañ e brezhoneg Gwened. Ar re all a zo bet disterc'h o oberiantiz. Goude-se, ar re o deus kenlabouret ar muiañ a zo : S. GOUZIERN (9 fennad, e gwenedeg), Erwan DANTEG (7), SEZNI (9), M. en UVEL (9 fennad e gwenedeg), BOEH Er SKORU (7 e gwenedeg), Jos PENPOUL (7 e gwenedeg), M.B. KOURTED (7 e gwenedeg), ABEOZEN-KERDILES (6), AN DIVROAD (6), AR PILHAOUER (5), KERLANN (4), Y. MAB KOIG (4), Fañch POULLAOUEG (4), Ch. GAONAC'H (3), LIORZHER (3), ABERWAN (2), Reun ARGANT (2), ARVORIAD (2), IWAN DRERGER (2), ROPARZ HEMON (3), E. er ROUZIG (2). 42 genlabourer all o deus roet bep a bennad d'ar gelaouenn.

Meulif a ranker dalc'husted TIN GARIOU, en deus skrivet ez-reoliek, ha betek war an niverennoù diwezhañ. Eñ ha L. er ROUZIG o deus savet o-daou kement a skridoù (131) hag an holl skrivagnerien all a-gevret (138). Moullet ez eus bet war L'HEURE BRETONNE un 260 a bennadoù bras a-walc'h e brezhoneg. Lod ar gwenedeg n'eo ket disterc'h tamm ebet, peogwir, ouzhpenn L. er Rouzig, o deus graet S. Gouziern, M. en Uvel, Boeh er Skoru, Jos Penpoul, M.B. Kourted, Gurval, René la Borderie, Mateh er Person, gant ar rannyezh-se.

Meulif a ranker dalc'husted TIN GARIOU, en deus skrivet ez-reoliek, ha betek war an niverennoù diwezhañ. Eñ ha L. er ROUZIG o deus savet o-daou kement a skridoù (131) hag an holl skrivagnerien all a-gevret (138). Moullet ez eus bet war L'HEURE BRETONNE un 260 a bennadoù bras a-walc'h e brezhoneg. Lod ar gwenedeg n'eo ket disterc'h tamm ebet, peogwir, ouzhpenn L. er Rouzig, o deus graet S. Gouziern, M. en Uvel, Boeh er Skoru, Jos Penpoul, M.B. Kourted, Gurval, René la Borderie, Mateh er Person, gant ar rannyezh-se.

Tamm ha tamm, a-hed ar brezel, eo kresket pouez ar c'helc'h-gelaouennoù e brezhoneg, GWALARN ha SAV o vezaf ar re a gonte ar muiaf a lennerien. Ar gelaouenn ARVOR, divyezhek, a zo bet savet e 1941 gant Roparz HEMON. Setu abegoù hag a zispleg, moarvat perak e teuas plas ar brezhoneg e-barzh L'HEURE BRETONNE da vezañ disteroc'h. A-hend-all, abalamour da gudenn ar paper, a rae diouer, e teuas bihanoc'h ment ar gelaouenn ha ret e voe eveljust krennañ ivez ar skridoù.

Hogen ul lec'h a chom bepred evit ar brezhoneg ha n'eo ket niverus ar skouerennoù enno pennad ebet e yezh Breizh-Izel (20 skouerenn hepken war 204 ; ar re-mañ int : 1, 13, 15, 16, 19, 20, 26, 28, 30, 32, 36, 38, 40, 42, 44, 46, 48, 49, 200, 204). Adalek an niverenn 52 zoken e vez ur pennad brezhonek hogos bep tro war bajenn gentañ ar gelaouenn hag evel-se e chom an traoù betek an diwezh.

P'o deus soñjet ar renerien reiñ ul lec'h a-bouez d'ar yezh en HEURE BRETONNE ez eo bet graet buan a-walc'h ur bajenn a-bezh pe er skritur K.L.T. pe e gwenedeg.

Ar bajenn K.L.T. a zo bet moulet en niverennoù-mañ : dindan an talbenn "Amzer Breiz" da gentañ (niv. 21, 25, 33) ha goude-se dindan an talbenn "Kerne, Leon, Treger" (niv. 37, 41, 45, 50, 53, 58, 63, 72).

Pajenn ar gwenedeg a gaver er skouerennoù meneget da heul, dindan an talbenn "Bro-Wened" (niv. 23), "Bro Guened" (niv. 27, 31, 35, 39, 43, 47, 51, 57, 64, 69). War a seblant, ur seurt kempouez o deus klasket ober renerien an HEURE BRETONNE etre ar c'h/K.L.T. hag ar gwenedeg.

Goude an niverenn 72 eta ne voe mui a "bajenn ar brezoneg" ; hogen ret eo menegif e voe brezhoneg e pep niverenn adalek an niverenn 50 betek an niverenn 200, diwar-benn kudennoù sevenadurel, arboellerezhel pe bolitikel.

Da notennif eo ez eus un toullad tud, bet o skrivañ e galleg, hag a ra implij eus lesanvioù brezhonek : Ronan, G. ar Barh, Yann an Tremenet, P. Taleg, Kerluen, F.J. Gourdel, Tad, Mab, Kalondan, Kerjegu, ar Guyader, Yann Gweltaz... da skouer.

[Faint, illegible text, likely bleed-through from the reverse side of the page.]

de brezhoneg e brezhoneg peurlunvan, d'ar lañ a viz Du. Ar pennad kentañ a zo hini Kerlann : Torgenn Gador, aoter Breizh nevezh, gant ur fazi, an H e dibenn "nevez" o vezañ a re. D'an 8 a viz Gouere e oa bet divizet dibab ar c'h/K.L.T.G. Skrivagnerien all a heuilh skouer Gerlann : Iwan Dreger (niv. 90), Erwan Danteg (niv. 105, 133, 137, 141, 144, 145, 149), Fañch Erard (niv. 112), Arvoriad (niv. 115). Youenn Drezen ar C'hernevad (adalek an niverenn 147) ha L. er Rouzig, ar gwenedad (adalek an niverenn 165) a ra ivez d'o zro gant ar yezh peurlunvan. Goude an niverenn 165 eta ne gaver nemet ar skritur ZH er gelaouenn, hag An Divroad, Merjareg, Eostig Kerineg, M.B. Kourted a heuilh ivez ar skouer. An holl a skriv neuze a bleg d'ar reolenn, Gwenediz -gant un tamm diaester war a seblant- evel ar re all, ha S. Gouziern zoken, gwenedad ivez, a sin neuze e bennadoù S. Gouziern.

Merkañ a c'heller ne zeu ket er-maez ken ar bajenn gouestlet d'ar c'h/K.L.T. pe d'ar gwenedeg pa vez graet ar menoz da zegemer ar skritur peurlunvan er gelaouenn.

Eno e c'heller gwelout ur youl gant ar renerien, o deus santet pouez ar gudenn : kaout un doare-skrivañ hepken evit ar brezhoneg (ha panevefe nemet evit ar c'helenn er skolioù). Poan o deus bet sur a-walc'h evit enebañ ouzh ar plegoù kemeret, ar boaz. Tin Gariou a blije dezhañ kentoc'h ober gant ar c'h/K.L.T. koulz ha L. er Rouzig gant ar gwenedeg. Hogen, a-benn ar fin, an holl a asantas.

AR BAJENN	1
AR BAJENN	2
AR BAJENN	3
AR BAJENN	4
AR BAJENN	5
AR BAJENN	6
AR BAJENN	7
AR BAJENN	8
AR BAJENN	9
AR BAJENN	10
AR BAJENN	11
AR BAJENN	12
AR BAJENN	13
AR BAJENN	14
AR BAJENN	15
AR BAJENN	16
AR BAJENN	17
AR BAJENN	18
AR BAJENN	19
AR BAJENN	20
AR BAJENN	21
AR BAJENN	22
AR BAJENN	23
AR BAJENN	24
AR BAJENN	25
AR BAJENN	26
AR BAJENN	27
AR BAJENN	28
AR BAJENN	29
AR BAJENN	30
AR BAJENN	31
AR BAJENN	32
AR BAJENN	33
AR BAJENN	34
AR BAJENN	35
AR BAJENN	36
AR BAJENN	37
AR BAJENN	38
AR BAJENN	39
AR BAJENN	40
AR BAJENN	41
AR BAJENN	42
AR BAJENN	43
AR BAJENN	44
AR BAJENN	45
AR BAJENN	46
AR BAJENN	47
AR BAJENN	48
AR BAJENN	49
AR BAJENN	50
AR BAJENN	51
AR BAJENN	52
AR BAJENN	53
AR BAJENN	54
AR BAJENN	55
AR BAJENN	56
AR BAJENN	57
AR BAJENN	58
AR BAJENN	59
AR BAJENN	60
AR BAJENN	61
AR BAJENN	62
AR BAJENN	63
AR BAJENN	64
AR BAJENN	65
AR BAJENN	66
AR BAJENN	67
AR BAJENN	68
AR BAJENN	69
AR BAJENN	70
AR BAJENN	71
AR BAJENN	72
AR BAJENN	73
AR BAJENN	74
AR BAJENN	75
AR BAJENN	76
AR BAJENN	77
AR BAJENN	78
AR BAJENN	79
AR BAJENN	80
AR BAJENN	81
AR BAJENN	82
AR BAJENN	83
AR BAJENN	84
AR BAJENN	85
AR BAJENN	86
AR BAJENN	87
AR BAJENN	88
AR BAJENN	89
AR BAJENN	90
AR BAJENN	91
AR BAJENN	92
AR BAJENN	93
AR BAJENN	94
AR BAJENN	95
AR BAJENN	96
AR BAJENN	97
AR BAJENN	98
AR BAJENN	99
AR BAJENN	100

DIBAB

ABEOZEN	Jakez Riou	p. 37
ABERWAN	An Teuz	p. 39
ERWAN DANTEG	Evit kelo se !	p. 41
ERWAN DANTEG	Gwin ardant an Ao. Person	p. 43
ERWAN DANTEG	Pipi Talleg ha Yann al Laorañs	p. 45
FANCH ERWAN	Emskiant pobl ha politikerezh	p. 47
TIN GARIOU	Ar brezhoneg hag al levenez	p. 49
TIN GARIOU	10 Mae 1940 un tu bennak e Bro-C'hall	p. 51
TIN GARIOU	Ened ha Meurlarjez	p. 55
TIN GARIOU	Evit c'hwec'h ugentvet bloaz an tren	p. 56
TIN GARIOU	Skol al louarn	p. 57
E. L.	Breizh, Bro-C'hall hag ar bed	p. 59
LEIHAM	Marv al labourer	p. 61
AR MASIKOD	Dominus vobiskom pe al latin e-touez ar brezhoneg	p. 64
AR PILHAOUER	Gant beg va c'hrog	p. 66
FANCH POULLAOUEG	Hor broig	p. 68
FANCH POULLAOUEG	Hor yezhig	p. 71
FANCH POULLAOUEG	Hor bedig	p. 73
FANCH POULLAOUEG	Skol beg avel	p. 78
REUN	Gwechall gozh, kennebeut, ne veze ket druz ar peuriñ	p. 81
JAKEZ RIOU	Termaji war ar blasenn	p. 83
SAIK	Ar prefed, an Aotrou Maer, hag an ed	p. 87

M. EN UVEL	<i>Ardou Pier Leathrenk, tad-kozh ma zad-kozh</i>	p. 89
M. EN UVEL	<i>Marv Minor Kergo</i>	p. 93
YANN VRIANT	<i>Yun ar C'halvez</i>	p. 95

ABEOZEN

JAKEZ RIOU

14 Genver, Deiz ha bloaz marv Jakez Riou. Setu aet e-biou ur bloavezh all abaoe m'eo marvet trumm hor c'heneil e Kastellbrien. Setu pemp bloaz m'eo bet tennet diganeomp ur mignon feal, ur breizhad gredus, ur skrivagner dare da vezañ e barr e vrud.

N'oufemp laret pehini eus an tri abeg-se da vagañ kalonad a zo ar gwashañ. Ken start 'oant kemmesket e buhez Jakez Riou m'eo ret deomp kaout keuz war un dro d'an den, d'ar brogarour ha d'ar marvailher.

N'oa ket bet tener ar vuhez evitañ. Ar re o deus lennet, e GWALARN Genver-C'hwevrer 1938, niverenn 110-111, ar studiadenn gaer, savet E KOUN JAKEZ RIOU gant Youenn Drezen, a oar kement-se.

N'eo ket d'an amzer, tremenet gantañ er skolaj en Euskadi pe Kastilha gozh, eo e klemmimp, d'e amzer-soudard an hini eo. Ha ne deo ket en abeg m'en deus gouzafvet en e galon ma kasaomp an amzer-se, ar boan galon a starta an den yaouank, hogen e-pad e vloavezhioù kazarn eo en deus tapet an deou glevied a viro outañ da gaout nerzh a-walc'h da enebañ ouzh ar skuizhder hag ar reuziadoù a vez lod kelaouennerien a zo.

Ondarribia ha Miranda de Ebro o deus daskoret dimp ur Breizhad klevet gantañ mouezh e ouenn, kazarnioù Bro-C'hall o deus kaset d'ar gêr, e 1921, da glask echuiñ pareañ, un den yaouank tizhet en e yec'hed.

Un doare Yannig a vil micher eo bet Jakez Riou e bloavezhioù kentañ e vuhez-gour. N'en doa nemet ur c'hoant : brezhonegañ. Al labourioù a rankas ober da c'hounit e damm kreun, n'oa ket

e galon gwall stag outo ha displegañ 'rae aes-kenañ diouzh ur vicher evit mont d'ober un esañ en un all. E gwirionez ar vicher a gelaouenner eo a zeree ar gwellañ outañ. Ne laran ket n'en defe ket karet kelaouenniñ en un doare breizhekoc'h, met kement-se a zo un afer all.

Jakez Riou, hag eñ o seblantout bezañ ur paotr dichipot, o c'hoarzhin goap d'ar vuhez, en deus ranket poaniañ evit dont a-benn da vestroniañ e bluenn gant an ampartiz a zo e dra e GEOTENN AR WERC'HEZ hag e NOMENOE OE !

Kavout a reer c'hoazh da brenañ LIZHER AN HINI MARV. Ne deo ket didalvez al levrig, hogen pebezh kemm etre skridoù doare romantel evel ar MORSKOULED hag ur berlezenn gevrinus evel EMBANNER AL LUDU. Er skridoù kentañ, gerioù a-builh, zoken e GORSEZ DIGOR, hag amañ a-ratozh, dre ma teu lod kaer eus ar farserezh eus stirlink ar gerioù dic'hortozañ, er skridoù diwezhañ eo pouezet pep ger, dilennet gant preder. N'eus ket unan a re a gavfe truez a-berzh ar marvailher, n'eus forzh pegen plijus e oa drezañ e-unan. Fellout a ra dezhañ skeiñ un taol, en doare-mañ-doare, e spered hag e kalon e lenner ha ne soñj nemet er pal-se en ur c'hwennat e skridoù.

Pell-kenañ, a lavar Drezen, ez eo skridoù peurechu Jakez Riou diouzh ar brouilhedoù kentañ. Setu perak ne ouezimp morse petra 'vije deut DAHUD da vezañ, na PEC'HED MARVEL GREGOR KOGAN, nag e eil zastumadenn kontadennoù. Hogen gallout a raimp c'hoazh kemer plijadur, dizale marteze, gant DOGAN. Ur farsadenn a zo kentoc'h eus lignez GORSEZ DIGOR, ha gant e droidigezh eus LAZARILLO DE TORMES.

Ar skouerenn am eus eus e GEOTENN AR WERC'HEZ a zo dediet din gantañ e "Breiz Nevez". "Breiz Nevez" ! Ha niverus int ar re o deus ranket mont da anaon a-raok gwelout heol ar frankiz o parañ warnout, pet ac'hanomp ! a ranko mont c'hoazh ?

Un dra a zle hor frealziñ ; "Breiz Nevez" a zo bev, a-benn bremañ, a pep unan ac'hanomp. Hag er feur-se, da vihanañ, netra na den n'hell mirout ouzhip da dizhout ar pal.

(niverenn 80)

ABERWAN

AN TEUZ

(Ar gontadenn-mañ a zo bet kontet din gant ur micherour eus Menez Arre. Un dro farserezh yaouankiz gwirion eo. Displeget eo amañ dres koulz lavarout, evel ma eo bet danevallet din).

Paotr Kola, un intañv erru war an oad, a oa aet abred da gousket gant e vab. O chom edo en un ti bihan e koad ar C'herno, ur vilajennig e-kreiz Menezioù Arre. Kregiñ a reas raktal da roc'hal rak skuizh-divi e oa. Edo ar paotr o vont da serrif ivez e zaoulagad pa welas, tra iskis, ur skeud ruz war ar voger, e-barzh ar gwele-kloz. Setu eñ o sevel goustadik e benn da welout a-belec'h e teue ar goulou-se. Gant daoulagad dispourbellet e verzas neuze un dra spouronus : ur penn ruz euzhus o tont hag o vont dirak ar prenestr. Yannig (anv ar paotrig) en em lakaas da ouelañ. "O ! emezañ, va zad, ur penn ruz er prenestr ! Sed sell 'ta buan, sell ! - Amañ hag a zo un teilhad gantañ, azig ha ma zo, eme paotr Kola, met Yannig a ouele atav. "Sell va zad ! Sell va zad, ar penn ruz !"

Setu Paotr Kola erfin o sevel e benn ivez hag oc'h astenn e c'houzoug er-maez ar gwele-kloz. Ha fi d'am doukou, ya va faotr, an dra-mañ a zo ur skouer hag a zo ! Feiz va faotr, emeur krog ennomp avat ! An dra-mañ a zo sin fall, sur, azig a zo. Ro peoc'h 'ta paotr, ro peoc'h 'ta ! A-greiz lavarout se, setu trouz ur c'hloc'h bihan, drilh, drilh, drilh, drilh. Ha fi d'am doukou, soñjet em boa va faotr e oa un teuz pe un diaoul ! Lez anezhañ hardis, me 'zo vont da skarzhañ diouzh an toull-mañ, ha feiz ya 'vat !

Nom de ma ine, biskoazh n'am boa gwelet kement-all ! Setu

avat gwashoc'h-gwashañ, ar penn ruz oc'h en em gavout e-barzh an ti hag o tont hag o vont war al leur-di. Ha feiz, va faotr, en em gavet eo tost dimp. Ro peoc'h 'ta marmouz ! Va zad, va zad, ne glevet ket ar c'hloc'h bihan ? -Eo da, klevout a-walc'h a ran, serr da c'henou 'ta ! Houmañ a zo ur fiezenn dimp, va faotr !

Plouf ! A-daol-trumm setu ar marichal (rak eñ a oa unan eus an dorfedourien !) a oa war an doenn o senañ ar c'hloc'h gant ul las dre ar siminal, o risklañ d'an traon gant trouz ar gurun. Ha feiz va faotr, emañ o vont kuit, rak kalz a drouz en deus graet avat !

An deiz war-lerc'h ez eas Paotr Kola da droc'hañ e varv hag a gontas ar pezh a oa c'hoarvezet : - 'Peus ket klevet ar pezh a zo en em gavet du-mañ en noz-mañ ? - Petra 'ta, Paotr Kola ? - Ha feiz, me n'ouzon ket avat. Kazi sur eo an diaoul an hini eo, azig ha ma eo ! ha fi d'am doukou me lâr dit, Jan, du-mañ a zo bet ur strobell avat ! Un trouz spontus en deus graet en ur vont kuit, ha ya, an dra-se a zo bet ur skouer din-me ma faotr. Me 'zo o vont da skarzhañ diouzh an ti daonet-se avat, ar c'hentañ ma c'hellin ! Ha koulskoude Yannig ha me a gavo diaes mont ac'hane, azig ha ma raïmp, rak fi d'am doukou me am eus graet mat eno, azig am eus. Me va faotr, am eus kant skoed hag ur vuoc'h a dalvez kant skoed all, ya, ha me a oa paour a-walc'h pa oan aet di !

Paour kaezh Paotr Kola, Doue d'e bardono ! An diaoul a oa ur pikol boetrabezenn kleuzet e-giz ur penn gant ur c'houlaoenn-goar e-barzh ha douget war beg ur vazh gant ur c'henseurt d'ar marichal !!!

(niverenn 34)

ERWAN DANTEG

EVIT KELO SE !

E-pad ar brezel all ivez e oa deut ar butun da vezañ gwall rouez. D'an ampoent e oa Pipi Taleg mestr-doriz e bourzh ar "Glycine", ha feiz, va faeron, Ewan Danteg (Doue d'e bardono !) a oa martolod gantañ. Ha dezhe bezañ mignoned vras, avat e oa etav hign-hañgn etrezo, evel ma 'z eus bet bepred etre Goeloiz ha Tregeriz, kalz pe nebeut.

Ken douget e oant d'ar butun, an eil hag egile. Met ma oa gwell ganto kaout karot da chaokat pa oant du-se, e-barzh brumennoù skorn an Douar-Nevez, ne raent ket fae war ur c'horniad, ur wech deut d'an douar. Ar bloaz-se, avat, pa voent distro da Bempoull, n'eo ket e vije keraet ar butun, nann, ne gaved ket anezhañ ken, setu.

Pa glevjont kelou eus an dra-se, setu hon daou ganfard oc'h ober ur pennad redek betek ti Soaz Gwilhou, a zalc'he burev-butun e run'n iliz.

"Va Doue, Pipi gaezh", eme dezho tintin Soaz, "kaer 'm bije klask ne gavjen ket ur gozh sigaretenn da werzhañ dit, ha pa vije ganit ur banerad teodoù moru eus an dibab !" Hag i, pinous da gemer penn o hent war-du Ploueg-ar-Mor, hag i etre daou, da c'houzout pe mandrouilhet e vije gante o zamm karot diwezhañ pe miret e vije betek gouzout...

Koulskoude, un nebeut deizioù goude dezhe erruout er gêr, setu m'en em gavas Pipi hag Ewan e ti Lom Maïvon Gêrfulup, d'ober un tamm gweladenn dezhañ. Ha patra a zispakas Lom eus e c'hodell diraze, nemet ur pakad butun ! Dispourbellañ a raas o daoulagad ha ken prim ha taol dent ur morvleiz, setu astennet o c'hrabanoù etrezek ar pakad, rak gouzout a ouient ne vutune ket Lom...

"Ota 'vat, paotred", eme hemañ, "n'oc'h ket o vont d'an

em gannañ evit kelou-se, 'g eo ? Gwir eo 'm eus nemet ur pakad, met, dampet, 'vo ket diaes deoc'h en em glevout evit daouhante-rif 'nezhañ, bo ?"

- Partajañ gant ar fripon Planiel-mañ ?" eme Bipi, krenn ; "James-biken ! Tout pe netra !

- Ya, ya, tout pe netra", a laras va faeron d'e dro ; "petra, reif eus va danvez d'an touseg goelat-mañ ? 'Rin ket, 'vat !

- Ugent real 'po evitañ, mar kerez", a c'houl Pipi.

- Daou skoed diganin", a ziskan Ewan.

- Seizh lur !

- Eizh lur !

- Dek lur !

- Pemp skoed !

- 'Dalv ket ar boan deoc'h", a respontas Lom, a wele anezhe prest d'en em zrailhañ. "'Mañ ket em soñj gonit arc'hant diwar ho koust gant va fakad butun. Tout pe netra ?... Mat. Gwelet e vo. Peogwir oc'h paotred dispar da soukañ war ar roeñvoù, hervez, marteze e vefet paotred dispar ivez da sachañ war ho kilhoroù, da welout piv a c'hounezo."

- Heñ ? Petra 'faot dit ?

- Ya, ya, n'eo ket war draezh Brec'heg e vo ar redadenn, met e-barzh ur pradad melchon am eus dre gostez Kêr-Fulup, e lec'h ma 'z an bep beure da gerc'hat boued da Vailhig ; c'hwi a zeuio ganin warc'hoazh, deufet ket ?

- Evit kelo-se ? Grimp 'vat !" eme Ewan.

- Met glizh a vo...", a lar Pipi.

- Foei, setu aze ur c'hozh paotr kizidik 'vat !" eme Lom. "'M eus aon ne oar ket petra eo ar fru ! Ma, n'eo ket lakaat ar c'hapo sired a vo graet, koulskoude, mont war lost ho roched 'laran ket !"

Ret e voe plegañ d'an divizoù-se. Va faeron a yeas ar maout gantañ, da lavarout eo kentoc'h ar pakad butun. Pipi a dapas ur sifern, eñ, ken e tregerne an aodoù hag ar maezioù betek Bilfod, pa strevie !

"Doue da 'z pinnigo", eme va faeron, dic'hoarzh ; "deus amañ, kozh pezh fall, - Bepred 'po ur c'horniad !"

(niverenn 141)

ERWAN DANTEG

GWIN-ARDANT AN AO. PERSON

Klevet em eus anv, meur a wech, gant va zad, eus person kozh Pleuveur. Bet e oa aluzener war al listri-brezel, ha miret en doa doareoù eeun-meurbet ha rust un tammig an dud a vor. Un den gentil e oa a-hend-all, prest atav da rentañ servij, goude bezañ klemmet un tamm evel ma tere d'ur person gredus.

N'ouzon ket penaos e oa deut va faeron, Ewan Danteg, da vezañ mignon gantañ. Pezh a ouzon e oa bet pedet va faeron hag e vignon bras, Pipi Taleg, eus Ploueg-ar-Mor, da zont da verennañ er presbital en deiz-se. Ha d'o lod o doa degaset ul legestr, ur mell hini, a oa bet aozet dispar gant lipig-mahonez gant ar garabasenn, Soaz Mengi.

Kaset e voe war-draoñ ar soubenn druz, al legestr hag al lipig, ar yar ouzh ar ber hag ar piz bihan, evel ma vijent bet o-zri divouedet ha blank o c'hof, hag o vezañ ma ouie an Aotrou Person e oa toull mat korzailhenn hon daou ganfard, en doa lakaet ar c'hog en e wellañ barrikennad sistr.

Bremañ e tegase Soaz ar c'hafe - ur c'hafe, tudañ kaezh ! neket dour-douilhoù evel ma vez evet bremañ diwar vez ha mo-c'haj'paotred ar Ribitailh... Hag amañ e larin deoc'h e oa person Pleuveur unan hag a gare c'hoari troioù-kamm d'e nesañ, o, evit c'hoarzhin, hep ober droug un disterañ ! Setu ma teuas e soñj paeañ ur bannac'h lagout d'an daou gomper, lagout diouzh e feson, peogwir eo dour ar puñs a lakaas e-barzh ar voutailh, ur voutailh poultrennek ha gwisket propr gant gwlad-kevnid.

Digeriñ a ra ar voutailh ouzh taol gant evezh bras, hag e tiskenn ul lommad mat e gwerenn Pipi Taleg. "Hemañ a zo lambig kozh emezañ ; tañva anezhañ hag e well, Ber !"

Per a savas e werenn, a sell outañ, a c'hwesa, a sell adarre
dic'hoarzh ouzh an Aotrou Person, a ev ur bannac'hig bihan
hag a lar :

"Ola, Aotrou Person ! Arabat c'hoari gant hemañ ! Hemañ a
lakaje deoc'h da voutañ war ho kof raoskl ken tev hag un
aoter !"

(niverenn 149)

ERWAN DANTEG

PIPI TALEG HA YANN AL LAORANS

Penaos e oa c'hoarvezet an dra-se, n'ouzon ket tamm ; pezh
a zo sur, avat, eo en doa graet Yann al Laorans e servij-soudard
er verdeadurezh-vrezel. "Yann al Laorans, piv hennezh ?" Ola
'vat, lenner, ne anavezit ket ? Ur paotr eeun diwar ar maez e
oa, genidik a drowardroioù kêr ar Roc'h, hag o terc'hel menaj
dre eno pa edo va mignon kozh Pipi Taleg e barr e oad. Hag e
oar an holl e korn-bro Landreger e voe ganet hor Yannig d'ar
sadorn d'abardaez, pa oa bet debret er grazenn gant ar plac'h-
tiegezh ur pennad mat a oa dija, - da lavarout eo ne oa ket
fin-daonet... Evelkent, ma kredan pezh a voe kontet da Ewan
Danteg, va sontr-kozh, gant an Taleg, e voe lakast anat un
deiz e klaske bezañ ijinus a-wechoù. C'hwi a zo o vont da
welout.

... Edont o zri, Yann, Pipi hag Ewan, o tont en-dro d'ar
gêr e permission. Sevel a rejont e Gwengamp e tref bihan
Pempoull. E-kichen hon tri martolod e oa daou studier, moarvat,
o vont d'ar gêr ivez, hag a vreaetae a vouezh uhel diwar-benn
kudennoù-jedif diaes pe iskis. Hag a hafvare Yann selaou oute
aketus, o teurel pled ken e pizenne an dour-c'hwez war e dal.
"Sell al loukez 'ta" eme Bipi d'am eontr ; "mañ o klask dis-
kiñ pegement e ra daou ha daou."

Diskenn a rae Yann e halt Pontrev. Hag e krede d'an daou
geneil bezañ disammet dioutañ. Setu an tref o loc'hañ. Ur
pennadig berr goude, e krog ar marc'h du da c'hwitellat, da
c'hwitellat, kement ha ken bihan ma tregerne kêr a-bezh ; hag
a-greiz-holl, chom a-sav, stardet-mat an holl votezi.

Ewan ha Pipi, petra a rejont, nemet lakaat o fri dre ar prenestr evel an holl. Ahont, dirak ar marc'h-du, e oa un den o tañsal hag o korollañ e-kreiz ar moged izelaet gant an avel, hag e krie evel un diskiant : "Te 'zo koll, marc'h-du, te 'zo koll ! ... Aon peus bet, hañ ? ... Alo, kerzh arre 'ta !..."

Yann al Laorañs an hini e oa.

Blenier an tref ha paotr ar gar ne voent ket pell a-raok kaout krog en e borpant, ha neuze, e voutañ dizamant e-barzh bagon ar pakadoù.

Adkavet e voe e Pempoull gant hon daou gomper, hag eñ toutek ha pabor war un dro, e-pad m'edo paotred Mari-Robin o sevel pa-per outañ. Hag e sunent beg o c'hreionoù. M'hañ lar deoc'h !

"Perak ac'h eus graet kement-se a charre ?" eme Bipi outañ.

- N'eo ket charre eo", a respontas Yann, c'hwez ennañ.

"Ur glaoustre ne laran ket.

- ?...

- Ya tudoù. Klaoustre e rin evel ho paotr, emon-me d'an daou studier, ha ne vin ket tapet o redek, ha pa vije ar marc'h-du oc'h ober ar c'had !

- Ma", eme donton Ewan, "aet oas da foll ar wech-se, paotr kaezh. Redek buanoc'h eget ar marc'h-du ? N'out ket mat !

- 'G on 'vat, daonet e vo va jol ! Selaouit kentoc'h pezh am eus komprenet diwar gontoù ar studierien. Likit e rae ar marc'h-du 50 kilometr en eur ha me 5. Aet oan kant metr larkoc'h egeti. Keit ha ma vije oc'h ober an dek metr nevez, e rajen-me unan all. Tostaat en dije graet ouzhin dalc'hmat, evel just, met bepred e vije bet ur pennadig hent bennak etrezañ ha me : n'hallen ket bezañ tizhet !

- Mat, mat !" eme Bipi, na wele ket sklaer war an taol... Met, lak ivez az piñe teuket war un dreuzenn-goad, petra az piñe graet ?

- Foei !" a respont Yann, o sevel war e elloù kilhogig rangouilh ; "vit kelo-se ? Pladañ diouzhtu etre ar roudennoù ha lezel an tref da dremen kuit a-raok sevel, panezenn-vor !

(niverenn 165)

FANCH ERWAN

EMSKIANT POBL HA POLITIKEREZH

Keer eo bet gouelioù pempkantvet dez-ha-bloaz Yann V a Vreizh. Kennerzhus e oa gwelout an engroez tud a bep stad hag a bep oad, re yaouank dreist-holl, bodet stank en-dro d'an Ao. Perrot, stourmer kozh ar brezhoneg, doujet ha karet gant an holl. Un devezh bras e oa evit hon istor hag evit hor yezh. Un devezh kaer : miliadoù a Vretoned bodet da ganañ gloar d'ar brezhoneg, da ganmeulif o roue kozh Yann V a sellent outañ neuze evel skeudenn Breizh divarvel, skeudenn muerded pobl ar Vretoned pa oa Breizh en he skedusañ, pa oa mestrez war he flanedenn. Tridal a rae an holl gant levenez ar spered broadel adkavet evit un devezh ; gant goanag e oa pobl Vreizh war hent an adsav hag ar silvidigezh goude bezañ bet trec'het ha bazh-yevet e-pad ur c'hantved gant hec'h enebourien.

Aze, e Landreger, e santed ur wech c'hoazh penaos n'eus nemet un tu da entañ karantez-vro ar Vretoned hag o lakaat holl da unvanif evit silvidigezh Breizh : broudañ o emskiant pobl dre gomz o yezh dezho ha lakaat istor o bro da advefañ dirazo. Ar Vretoned a verv holl gant an hevelep trid-kalon pa verzonet penaos e kresk brud hag implij o yezh eus an eil bloaz d'egile, pa vez degaset d'o c'houn darvoudoù skedusañ o istor.

Ar yezh, an istor, setu div elfenn bouezusañ pep broadelezh, setu div elfenn-diazez ar vreizhadelezh a zle pep brogarour pleustrif warno. N'eo ket a-walc'h doujañ ar brezhoneg ha bezañ lorc'h gouzout ez eo ledet istor Breizh hed-ha-hed daou gantved warn-ugent. N'eo ket a-walc'h mirout an holl vadoù degaset dimp gant hor gourdadoù, ret eo dimp ober ganto. War an da-chenn-se, pep broadeler e Breizh a dle kemer skouer war beotred ha merc'hed ar Bleun-Brug o deus graet kement da advefañ ha

da startaat an emskiant vroadel e Breizh. Deskiñ pe peurzeskiñ ar brezhoneg hag istor Breizh, setu an dalc'h.

Ne weler ket mat e gwirionez petra e c'hallfe bezañ broadelerion vreton divrezhonekaet ha dizesk war istor o bro, oc'h ober stad atav eus o broadelezh a rafent fae war bep elfenn anezhi. Netra padus ne vo graet e Breizh keit ha ne vezo ket astennet da vat implij ar yezh vroadel hag anaoudegezh an istor broadel. Dlead pouezusañ pep broadeler, pep brogarour, eo en em vrezhonekaat ha deskiñ petra eo bet labour ha strivadennoù ar Vretoned e-doug ar c'hantvedoù tremenet.

Arabat dezho koulskoude ankounac'haat biskoazh an droug graet da bobl Vreizh gant ar vistri o deus klasket mougañ hor broadelezh a bep eil dre al lazhadeg ha dre ar c'homzoù flour. Ret eo herzel outo da genderc'hel, ret eo herzel ouzh Pobl Vreizh da vezañ touellet adarre gant hec'h enebourien, ret mat eo neuze en em gannañ war an dachenn bolitikel. An emskiant vroadel a zo ret da Vreizh evit bezañ, ar stourm politikel a zo ret da Vreizh evit advefañ. Hep brezhoneg, Breizh ebet, mes, hep politikerezh, pazenn war-raok ebet e Breizh.

Kaer ha talvoudus evel m'eo al labour-diorren, n'eo nemet labour diglok ma ne vez ket pleustret war un dro war an obererezhioù politikel. Ur palez kaer diechu a lez dindan ar seizh amzer holl draoù priziüs an diabarzh. An obererezhioù politikel a zo toenn ar palez. Disoñjal ar wirionez-se a zo ken souezhus ha ken arvarus pe dost evit broadelerion ha disoñjal en em advroadelañ.

(niverenn 112)

TIN GARIOU

AR BREZHONEG HAG AL LEVENEZ

Hennezh a zo ur paotr laouen.

Hennezh a oar lakaat an dud da c'hoarzhin.

Sell aze komzoù a glevan du-mañ du-hont ken lies ha bemdeiz war sujed Bretoned, kenvroiz deomp. Sell aze ur veuleudi a zo bet roet, en o amzer, da Brospér Proux, paotr ar *Jabadao ha Kaniri* ha *Bombard Kerne*, da Yvon Crocq, aozer fentus *Kleñved an Aotrou Fistouliq* hag *Ur sac'had marvailhoù*, da Jakez Riou, skrivagner ar *Gorsedd Diqor*, *An Ti Satanazet*, *Nominoe-oe ! Torfed ar frer Juniper*, ha me oar-me.

Daoust hag eo abalamour d'ar brezel, d'ar vuhez diaesoc'h, e kêr muioc'h c'hoazh eget war ar maez ? ... Abaoe m'eo marv Jakez Riou, ar skrivagnerien vrezhonek n'ouzont ket mui c'hoarzhin, na lakaat o lennerien da c'hoarzhin. Ar baotred distagallet mat o zeod ne skrivont ket mui nemeur a vommoù farsus.

Kement-se n'eo ket mat.

O ! Ne c'houlennan ket digant va c'henvroiz c'hoari o farouelled, en em lakaat droch evit ma tivousklenno o amezeien, pe magañ o joa gant goaperezh diwar goust an nesañ...

Meur a zoare a zo da skuilhañ joa ha levenez en-dro deomp, da lakaat ar c'hoarzh da vleuniañ.

Soñjal a ran e kamaraded din, paotred drant mar deus, konterien dispar anezho, gant ul lemm a bluenn, ouzhpenn etre o bizied. Nemet labaskenned, va Doue ! ... Labaskenned !... p'eo ret kregiñ er bluenn !

En anv hor c'henvroiz a Vreizh, goulenn a ran diganto ober un hej d'o leziregezh, hag ober deomp, bep an amzer, aluzen ur skridig sart.

Ma vo plijadur adarre gant ar brezhoneg !...

(niverenn 133)

TIN GARIOU

10 MAE 1940 UN TU BENNAK E BRO-C'HALL

A-raok an 10 a viz Mae, e oa brav ar vuhez gant ar soudarded, er c'hornad-bro, m'en em gaven, un tu bennak e Bro-C'hall, da lavarout eo e Fossoy, war vord kleiz ar ster Marne, kichen Kastell-Thierry.

Hol labour ? Sellout ouzh an nevez-amzer o tigeriñ e vleuniou, selaou an eostig o kanañ, evañ gwinn ruz, merc'heta un disteraig ; gortoz en ur ger berr.

Cheñchet e voe penn d'ar vazh gant talm-kurun an 10 a viz Mae. Arsailhet e oa bet war un dro gant arme vras an Alamanned, Bro-Holland, ar Beljik, al Luxembourg ha darn eus al linenn Maginot.

Hep koll re a amzer, e oamp bet kaset da ober hol labour war-du Namur. Gallet hor boa justik a-walc'h erruout betek harzoù ar Beljik...

... Aet e oamp kuit, damlaouen, da vale bro...

Kaerat baleadenn, e gwirionez ! Kirri-nij alaman o tiskenn trumm diouzh barr an neñv, dre e-giz sparfilli, ken izel, ma heje begoù ar gwez, penn-da-benn an hent, o stlepel ouzhimp bombezennoù, tra ma kouezhe bolodoù ar mindrailherezhoù e-giz ar grizilh.

Mesk-ha-mesk, soudarded, siviled, merc'hed, bugale lazhet, pe mac'hagnet euzhus, ha dilezet war vord an hent pe e parkeiertro-war-dro kirri-tan devet, tiez freuzet, hentoù toull-didoullet, hag ar peurrest.

Graet hor boa anaoudegezh gant ar brezel nevez ! Hini ar c'hirri-nij.

Hol letanant n'ouie den da belec'h e oa aet. Pa zegouezhas

trumm warnomp - un tu bennak etre Bohain ha Le Cateau. Skoelf e oa :

"Buan, buan," emezañ. "Tec'homp ! Emañt erru !"

Piv ? Petra ? Kirri-emgann bras an Alamaned, na petra ! Hervez "communiqué" hon arme, e oa dalc'het an Alamaned uhelloc'h eget Sedan ha Namur !!!

Ne voe ket seizhdaletoc'h ar baotred o sankañ tizh en o gweturioù dre-dan. Kollet o doa o c'halon brezelgar, mes pas o divesker da redek.

Treuziñ a rejont, buanoc'h c'hoazh, eget na oant deut, en desped da japeledadoù kirri ar refujieed, Bohain, Saint-Quentin, Soissons, Kastell-Thierry. Hag, en ur dec'hout, ne dennent ket o daoulagad diwar an oabl.

Ne dennas ar baotred reizh adarre war o anal, nemet p'o devoe treizhet en-dro ar ster Marne, e Kastell-Thierry.

Ehan a rejont, en noz tefival, e kêrig Dormans, atav war vord kleiz ar ster Marne.

Eno e oant da chom, hag eno e kave dezho o dije peoc'h, rak ar "front" a oa du-se, keit-all, uhelloc'h ! Ha kousket a rejont dereat, an nozvezh-se, war un ivinad plouz pe war al leur-zi. Ha mat a voe d'o staoñ, antronoz mintin abred, ar banne kafe gant ul lip-e-bav e-barzh, en un ostaleri. Rak kollet e oa bet en hent ar gegin, ar "roulante", mar kavit gwelloc'h !

Ha lorc'h enno o kontañ d'an neb a gare edont o tont diouzh ifern an tan. E gwirionez, n'o doa gwelet emgann ebet. Nemet mesket e oant bet, mell-divell, e froudad sabatuus tec'hadeg armead ar Meuse, hini ar jeneral Corap. Peadra digalonekaat un den dir. Ha va c'hamaraded n'eo ket dir e oant, mes Gallaoued. Ne oa, em c'hompagnunezh, Breizhad ebet nemedon.

E Dormans, eta, e kredas dimp e vijemp didrabas. A-dra sur, e oa war an hentoù kalz sivilid o vont war droad, e kirri-tredan, pe e kirri bras ar Beljik sternet outo n'oa den pet marc'h, hag o tougen tiadoù tud, arrebeuri, binvioù labour, loened, kement tra a c'helle bezañ douget. Gwelout a raemp ivez o tegouezhout soudarded kollet ganto o rejumantoù, ha ne ouieomp pe du treiñ.

Met, ivez, digor e oa en ostalerioù, ar burevioù butun, ti ar baraer, an "Economique", ar c'higer, an ti-post.

En ur ger berr, bevañ 'rae kêr Dormans. Hag hegarat e oa an dud ouzhimp. Ne c'houlennemp ket muoc'h.

Ha setu petra c'hoarvezas. D'ar sadorn, 18 a Vae, diwezhat a-walc'h, d'an abardaez, e tegouezhas kirri-nij, hag a laoskaas daou japeledadig bombezennoù war gêr : unan eus kostez monument ar soudarded marv er brezel all, an hini all e karter ar pont, kichen ar gar. Ne rejomp ket nemeur a van.

Antronoz, avat, hag a oa sul, 19 a viz Mae, Gouel Sant Erwan, ne zigoras na prenestroù na dorioù. Medisined, notered, paotred ar burevioù-butun, kenwerzherien bihan ha bras, an dud-e-karg o-unan, aet e oa kuit an holl. Ken buan, ma oa bet disofijet ur vatezh gant he mistri en he c'hrignol. Ret e voe dimp mont da gerc'hat ar plac'h paour gant ur skaul. Lakaet e voe ivez soudarded da boazhañ bara evit ar refujieed hag evit ar soudarded dianket.

Ur gêr varv e oa deut da vezañ. Ne chome digor nemet daou pe dri ostaleri : ur c'hañs evidomp, rak anat deoc'h emañ atav ar soudard diwar sec'hed.

Ha me a zeue soñj din, dres a-walc'h, e oa ar sulvezh-se va gouel, dre ma oa bet roet din, e-touez va lesanvioù, hini Sant Erwan benniget.

Kontañ 'ris va gwenneien. N'oa ket bras o bern, peadra, koul-skoude, paeañ meur a voutailhad gwinn gwenn ar vro d'am mignoned. Feiz ! ne droas ket re fall an holl an traoù. Marteze e ouzoc'h petra eo ober la bomb ? Va c'hamaraded ha me hor boa, a wenneien, dres peadra degas un tammig gwrez d'hor fri hag hol lakaat da vezañ laouen. Graet hon eus la bomb, memes tra, un diael a vomb ! Pe gentoc'h bet hon eus bet bombezennoù war hor penn a-hed Gouel Sant Erwan benniget. Edomp oc'h ober un tammig lipadennoù en un "Hôtel des Voyageurs" bennak, e-keit ma oa tud an ti o sammañ o arrebeuri e kirri-tan. Reif a raemp an dorn evel just da zilojañ ar meubl pe ar pakadoù pounner, ha mestr an ti ne oa ket skrañgn gant e voutailhadoù. A-wechoù, e-kreiz ma oa bec'h warnomp o sevel ur samm pounner er c'hamion, e hope an eil pe egile : "Ur c'harr-nij !". Lezet e veze an armel pe forzh petra da gouezhañ a-stlap war an hent, dizamant, hag e rede an holl d'ar c'hav, ur c'haer a gav a vro-Champagn, gant ur volz tev.

Glas e oa lod eus ar baotred. Ar merc'hed, evel just, a lefve forzh o c'halon.

A-wechoù, e oamp bet pennfollet gant ur c'harr-tan diesel. A-wechoù all avat, e veze gant strolladoù kirri-nij. A-belec'h an diaoul e c'helle an Alamaned bezañ tennet kement-all a girri-nij ? Hag ar bombezennoù o tarzhañ a rae trouz ar gurun, hag an ti a veze hejet, kav hag all, gant strofs an aer.

D'an abardaez, poent bras dimp avelañ hor penn, ez ajomp da vale dre ruioù ar gêr varv. Nepell eus ar pont, hed linenn-houarn tren bras Paris-Strasbourg, e oa bet distrujet gant ar bombez tiez ur ru anvet Faubourg de Marne. An tiez n'o doa mui na toenn na talbenn. Unan zoken a oa beuzet gant dour ur ganouc'hell faoutet. Edo, memestra, o ferc'henned o tastum o faour-kaezh danvez hag oc'h aozañ o gweleoù evit tremen an noz er seurt dismantrou hej-dihej.

En noz, e tegouezhe va zro-gward etre deg eur hag hanter-noz. Edon va-unan, e-kreiz plasenn an ti-kêr, un ti-kêr savet gant mein Bastille kozh Paris, mar plij ! Sklaer e oa an oabl, gant pikoù stered diniver. Ha didrouz Dormans evel ur vered. N'oan ket re em butun, rak du-hont pell e kleven a-wechoù frañv ur c'harr-nij, gall marteze, mes suroc'h alaman. Ha sec'hed am boa ivez.

Ur wech bennak, e teuas ur soudard dianket da rannañ kaoz ganin ur pennad. Ur c'henvroad e oa, Lamour, eus a Bloeren, kichen Gwened.

"Ma 'z aes da gafe-di Boher, ru ar Porzh, e Gwened," emezañ, "te o saludo eus va ferzh.

- Ha te," emeve, "kerzh da gerc'hat din un dra bennak da evañ. Emao o tidentañ." Ha Lamour kuit da gerc'hat din ur c'hartad dour e kanouc'hell an ti freuzet.

A-benn neuze e oa tost hanter-noz. Echu oa va zro-gward hag ivez Gouel Sant Erwan, un tu bennak e Bro-C'hall, evit ar bloavezh 1940. Echu am boa gouel va faeron santel diwar zour.

(niverenn 45)

TIN GARIOU

ENED HA MEURLARJEZ

"Echu an Ened
N'on ket jenet
Echu tout !
Debret 'n arc'hant."

Klevout a ran, e don pellañ va eñvor, heglev ar sonig-se, a ganemp, goude tri devezh a blijadur hag a ebatoù -deizioù maskaradenn !- a-raok mont da gerc'hat ludu war hon tal, en iliz, hag ober kofig moan e-pad daou-ugent devezh ar C'horaiz.

Ar sizhun dremenet, avat, n'eus ket bet digarez d'ar yaouan-kiz, er gêr vras ma vevan, d'ober diskan d'an Ened, anvet ivez Meurlarjez. Treut eo ar geustereñ : pelec'h emañ ar chotennoù-hoc'h ha kouignoù deus an amzer gwechall ? Hiviziken eo koraiz bemdez ganeomp er c'hêrioù bras. Hiviziken emaeomp bemdez etouez al ludu : ludu an tiez tarzhet ha pulluc'het gant ar bombezadegoù. Ul ludu a laka da skedif dalc'hmat en hon eñvor diougan hor Fivvezioù : "Dalc'h soñj, mab-den, n'out nemet poultrenn, hag e troi en-dro da boultrenn !"

Ar brezel a zo ! Gwasket omp gantañ peurwashoc'h bemdez. Ha ma ve un dra bennak da ganañ, ar "Miserere" an hini a vefe. Ha digalonekaat a raimp neuze ? Ha teurel an trebez war-lerc'h ar billig ?... Ha ne raimp ket ! Ne raimp ket seurt fazi enep an natur hag ar skiant. Goulenn a ra an natur diganeomp bevañ, kas da benn ar gefridi ma 'z omp bet lakaet war an douar eviti. Kemenn a ra deomp ar skiant ne bad ket atav ar reuzeudigezh. Ha setu ivez Kentel Veur an Iliz : goude amzer du ar C'horaiz, goude marv Salver ar Bed, e splann an Dasorc'hidigezh, ez enaouer en-dro an holl c'houleier evit kanañ an "Allalulah !" Goude ar goañv e vleugn an nevez-amzer... Ha n'eus brezel ebat, ne zegas ar Peoc'h d'e heul.

(niverenn 188)

TIN GARIOU

EVIT C'HWEC'H UGENTVET BLOAZ AN TREN

Anavezet em eus un den kozh, eus Poullan, e-kichen Douarnenez, ha n'en dije ket lakaet e dreid en un tren, evit un tenn. Re zañjerus e oa ar c'hirri-se, emezañ !

Ha pa zimezas e vab e Brest, e sternas e varc'h ouzh e charabañ, hag ez eas d'ar friko dre an hent bras.

Moarvat, ne gaver ket mui kalz tud, n'int ket bet en un tren, pe a nac'hfe e dalvoudegezh estlammus.

Ac'hanta ! Setu un tammig ouzhpenn kant vloaz n'oa ket heñvel. Ne grede ket an dud en dije gallet an trenioù ober berzh, ha speredekañ aotrounez Bro-C'hall, da skouer, a veze dibunet ganto sotonioù diwar-benn ar gavadenn nevez, peadra lakaat un azen da zont ruz.

Tud evel Thiers, Lamartine, Arago, ha me oar-me, n'o doa fiziañs ebet en trenioù. Embann a rae Thiers -e kador-brezeg Kembr an Deputeed, war ar marc'had,- ne bignfe biken un den gant e skiant en "archedoù-se war rodoù" ! Dont a rae Lamartine war e sikour, ha lavarout a rae hemañ e oa bet ijinet an tren gant an diaoul... Na muiañ, na nebeutañ !... Ha, forzh penaos, n'oa ket evit padout.

D'am meno, avat, n'eo bet kavet gant den bravoc'h digarez eget gant Arago da enebañ ouzh an tren paour. Arago a oa anezhañ unan eus gouiziekañ tud e amzer. Pezh na vire ket outañ da varn krenn ha krak an hent-houarn gant an abeg-mañ : ma tegouezh d'un tren tremen dindan un hent dindan-douar, un "tunnel", e tapo ar vevajourien "tomm ha yen", hag e kouezhint klañv.

O skiant-prenañ !

(niverenn 172)

P.c.c. TIN GARIOU

SKOL AL LOUARN

Lavarit ar pezh a blijjo deoc'h : traoù ez eus war an douar hag a ra plijadur. Da biv ? Da Lan hag Herve, a dra-sur, mes ivez da Ber, da Baol, da Jakez, da Erwan, da Youenn, en ur ger berr, d'an holl Vrezhoned, d'ar re yaouank evel d'ar re goshoc'h, gant m'o devo bevet war ar maez pe e bourkoù Breizh-Izel.

Evidon-me, n'eus ket kalz a dra oc'h ober plijadur din, evel soñjal em amerioù kentañ, pa 'z aen d'ar skol. N'em eus ket lavaret d'ar skol gristen pe d'an hini all -hini an diaoul, sañset-, lec'h ma veze skolaerien o vourevañ ac'hanomp, war zigarez deskiñ deomp lenn, skrivañ, niveriñ, h.a., h.a. E galleg evel just !

Nann ! Ar skol a blijje din ha d'al lakepoded eus va oad, a oa Skol al Louarn. Treiñ a raemp kein d'ar gêr, kuzhañ 'raemp hor sac'hadig levrioù en un toull kleuz bennak, hag ez aemp da c'haloupat war ar maez... da zeskiñ anaout al laboused hag o vioù, al loened hag ar plant, da zastum skiant krouaddezh Doue. En ur ger berr, ne vezen ket gwelet nag er skol gristen, nag e skol an diaoul ; en hini al louarn ne lavaran ket.

Ha, me deut war an oad, e kredan anzav n'em eus ket keuz da vezañ bet alies e skol al louarn.

Kement-mañ a zo evit reiñ deoc'h da c'houzout al levnezh a zo tarzhet em c'halon o welout bugale vihan oc'h heuliañ va skouer ; hag e-kreiz kêr Gemper, mar plij !

Ya ! Bugale vihan Gemper a ya da skol al louarn !... Ha klaskit petra 'reont eno... N'ouzoc'h ket ? Deskiñ lenn ha skrivañ brezhoneg !

Ar wech-mañ al louarn - al louarn, lesanvet Alan evel paotr

e bevar bav- a zo un den, a zo ur skolaer a vicher, hag a vod en-dro dezhañ, bep yaou, ar vugale evit brezhonegañ ganto. Ouzhpenn un dousenn e vezont, kaset digant o c'herent, hag a gemer plijadur, va Doue ! O selaou kentelioù al louarn.

Bugale eürus hag a zesko, a-vihanik, lenn ha skrivañ yezh o zudoù e-lec'h bezañ kontammet evel domp-ni, gwechall gant ar skol c'hallek !

(niverenn 77)

E. L.

BREIZH, BRO-C'HALL HAG AR BED

Breizh a zo 'vel ur c'hozh ti, dezhañ ur prenestr hepken, ur prenestr a sell war Vro-C'hall, e-lec'h ne zeu ennañ nemet un avel flaerius, karget a glevvedoù.

Ma ne fell ket dimp mougañ, digoromp prenestroù all war ar bed ha digoromp anezho frank evit ma teuo an heol e-leizh e-barzh an ti.

Ni Brezhoned, ne glevomp netra nemet ar pezh a fell d'ar C'hallaoued lavarout dimp, ne welomp nemet ar pezh a blij dezho diskouez dimp, n'ouzomp nemet ar pezh a fell dezho deskiñ dimp, -ha peurliesañ n'hon eus klevet ha desket nemet gevier.

E lec'h all, koulskoude, ez eus traoù kaer ivez, traoù kaeroc'h eget ar pezh hon eus gwelet betek-hen. Sellomp tro-dro dimp, selaouomp ar pezh a vez lavaret dre ar bed, selaouomp mouezh pep bro ! E-giz-se, e teuimp da c'houzout pelec'h emañ ar wirionez.

Dec'h e oamp bihan, hag hol lez-vamm Bro-C'hall a gemeras truez ouzhip. Kement-se da vihanañ, a fell dezhi reiñ da gredif dimp. Deskiñ a reas dimp kerzhout, ha deskiñ a reas dimp petra 'oa ar vuhez (dre gas ac'hanomp d'en em lazhañ eviti !) gwall-cheñchet eo an traoù hiziv. Erru omp bras, hag al lez-vamm a zo aet war an oad ha fall ar stad ganti. Ha bremañ e fell da hounnezh kaout harp digant ar Vrezhoned evit chom en he sav. Bremañ e fell dezhi sunañ ac'hanomp gwashoc'h eget gwechall. Ha tud a gaver da lavarout ne vefe ket dereat dilezel anezhi en droukverzh.

Gast ! Peseurt karantez he deus diskouezet evidomp biskoazh ?
Ha dleet e vo dimp mont ivez d'he heul d'ar vered, e-barzh an
toull-bez ?

Evit bugale omp bet kemeret betek-hen (koulskoude, pa veze
ret mont d'ar brezel, e veze gwazed a-walc'h ac'hanomp !).
Betek-hen e soñje d'ar C'hallaoued e oa dleet dezho paskañ
boued dimp evel d'ur babig.

Echu an amzer-se. Brazik omp bremañ. Bras a-walc'h evit
kerzhout hon-unan, evit en em zibab hon-unan. Ha re gozh eo
hol lez-vamm ivez evit paskañ yod dimp !

Gwellañ tra hon eus d'ober, Brezhoned, eo aozañ hon tammig
keustereenn etrezomp. E-giz-se, e ouezimp petra 'vo lakaet
e-barzh, en doare-se ne vimp ket kontammet.

Breizh digabestr, ha buan !

Un dra a zle hor frealziñ : Breizh Nevez a zo bev, a-benn
bremañ, e pep unan ac'hanomp. Hag er feur-se, da vihanañ,
netra na den n'hell mirout ouzhip da dizhout ar pal.

(niverenn 33)

LEIHAM

MARV AL LABOURER

D'ar 15 a viz Kerzu 1933 e kuitas Job Padeleg klafvdi Gwened.
Eürus e kemeras hent e di, ur pakadig dilhad dindan e gazel.
Daou viz e oa bet gant ar puruzi ha gant poanioù garv. Ma oa
gwanaet e skiantoù, atav e kave c'hoazh en e lec'h ar bad-
mañ...

A bazoù bras e tiskennas d'ar ru vihan e-tal gwazh ar varn.
Aze e loje tri bloaz 'zo 'barzh ur gambr dindan doenn ur c'hozh
ti bras. A-c'houdevezh en doa dilojet da Wened. Fall soñje oa
ket. Ne gawe mui labour e-mesk tud ar vourc'hig, rak barrig e
oa an arc'hant d'an termen-se war ar maezioù. E kêr ma labourer
plañ ha propik e oa e draoù gantañ e-barzh e gognell.

Ne gollas ket kalon, e oa war e ugent vloaz ha ne oa ket
evit bezañ soudard. Sur ouzhpenn sur eñ a gavfe labour embarr.

An deiz war-lerc'h, e oa bet e ti e vestr. Ar gwellañ
digemer a gav gantañ, met ne oa mui labour evitañ, diwezhatoc'h
sur-mat en devoe kavet. Un dornad karantez, ur werennad gwin
ruz ha setu anezhañ trugarekaet evit e dri bloaz labour hag
evit holl ar vizer en doa eostet ganto.

Hag evel-se e-pad sizhunvezhoù ha mizvezhoù e lerer
dezhañ bemdez pe dost :

"Diwezhatoc'h, ni a walo !... Dauit du-mañ gwech ha gwech ha
marteze."

Met an naon hag ar vizer biskoazh ne c'hortozont. Kent pell
e oa Job war ar ru, toull e votoù ha lous e zilhad. Nauza ne
dalveze ket dezhañ klask labour, bremañ a-hed e amzer e vo ur
pilhotour.

En dristidigezh vrasañ en em gave Job daou vloaz goude evit Gouel Nedeleg. Pasaat a rae don, ha noz ha deiz e krene gant an derzhienn. Blank ebet n'en doa mui evit prenañ boued hep komz a remedoù. Neozh ne venne mui tostaat d'ar c'hlañvdi. Ha daoust d'ar glav kouezhañ, Job a oa savet ha diskennet 'barzh ar ru da c'hortoz an oferenn greiz noz.

Krasat-kaer, dilhad re ledan war e gorf, eñ a gerzhe gant e vizer a ru da ru. Ar glav a gouezhe a varradoù pounner, kaset ha digaset gant an avel foll, dre ar ruioù. An tredan a daole splannder kriz war ar pavez gwalc'het gant ar glav hag ar gwez dizeil. An dud gronnet tomm a rede a bep tu d'ar sinema pe d'an tavarnioù.

Job Padeleg a selle hir ouzh ar prenestroù en tiez. Amañ ar jazz a ziroc'he sonennoù a-forzh. Paotred ha merc'hed stardet mat, a droe, a droe... Job a glask ur maen, met evit petra ? Ne bellaer ket ar c'helien a-zioc'h un tamm kig brein.

Un nebeut tiez pelloc'h tri a vugale a luc'h o botoù dindan sell karantezus o mamm-gozh blev gwenn dezhi. Ar re-se a c'hortoz Donezon Doue...

Din ! Din ! Don ! An avel foll a stlej gantañ son sklintin ha son trouzus ar c'hleier o sevel a ra en oabl evit o c'has war barkeier Breizh, a dreuz d'ar glav pounner a foet an douar.

Hag en ilizoù e lugerne kant ha kant gouloù. An dud a gemer o lec'h war o c'hadorioù, Job a chouk en ur c'horn tefval war ur gozh kador...

Setu ur wrac'h o tostaat dezhañ gant ur sell fall.

"Pemp plank, Aotrou ?

- N'em eus ket !

- Dilojit neuze !

- Ho pet truez, sellet na skuizh on.

- Er-maez ! Er-maez !" a respont ar wrac'h.

Ha ret mat eo da Job dilojañ. Eñ a sav hag e kerzh er-maez. Harpañ a ra ouzh moger an nor-dal en ur c'horn. A galon e heuilh oferenn ar C'hanedigezh...

Echu eo an traoù. An dud a gemer hent o zi, ur pred mat ouzh o gortoz. An orgleziou a gorn atav, ar gouleier a varv unan war-lerc'h unan all hag emañ goullou an iliz. Job a guitaas neuze e lec'h hag a ya davet e di

Bremañ e teu ar sec'hed dezhañ, kresket he deus an derzhienn warnezañ e-kreiz an avel foll hag ar glav. Pe c'houlenne an aluzen gant an dud, mab Doue en deus goulnnet dezhañ memes en noz-mañ. Ar sec'hed a stard e c'houg...

Setu ur vaouez en defvalded, tri c'hrouadur da heul ganti. Job o c'hortoz. Ur vamm a ra bepred an aluzen.

"Ho pet truez, klañv on. Ur blank mar plij..."

Ar vaouez a sell outañ hag e ya gant he hent, ar vugale oc'h en em stardañ outi. Aon o deus rak Job. Eñ a zalc'h atav d'o heuliañ.

E penn ar ru, ar yaouankañ a red a-raok e vamm da dreuzañ ar c'hroazhent. Eñ a strebot, a gouezh war e gof war ar pavez. Un tan-karr, leun a festerien, a ziskenn a-dal dezhañ. Job a sailh plom hag e skarz ar c'hrouadur dirak ar rodoù. Drailhet ha flastret eo korf ar paour kaezh pilhotour. Ar gwad a red eus e veg, eus e fri hag eus e ziskouarn. Aet eo e ene da gemer lec'h d'ar banvez kaer a oa en noz-se 'barzh an nefv evit Ganedigezh ar C'hrist azeulet.

... An tan-karr a heuilh ar ru, e-barzh an dud a skrign, a gan atav...

... Ar vamm, he c'hrouadur tre he divrec'h a red d'ar gêr...

En antronoz e lakaer war ar c'hazetennoù : "Lazhet eo bet ur pilhotour gant un tan-karr, emichañs kousket war ar pavez gant e gortad sistr."

(niverenn 23)

AR MASIKOD

DOMINUS VOBISKOM PE AL LATIN E-TOUEZ AR BREZHONEG

Mousc'hoarzh a zo bet e-touez an dud, an devezh all, e lez-varn Kemper. Ur vaouez kozh diwar ar maez he doa da respont evit un tamall spontus : e-pad ur c'hrogad gant un amezeg, he doa roet dezhañ un taol-dant ken taer, ma oa bet troc'het biz an den paour.

An hini gozh a nac'he, evel ma nac'h dalc'hmat an holl damallidi. Hag hi, imoret, ha lavarout a-benn ar fin :

"Benedisite Dominos, mar deo bet debret e viz da hennzh, n'eo ket me a zo kaoz !..."

"Benedisite Dominos" !! Petra a zeue ar gerioù latin-se da ober e brezhoneg ur vaouez kozh a Vro-Gernev ? Moarvat e oa meneg ur biz debret ganti -hag hep tiked, sur a-walc'h-met degas ar "Benedisite" war ar marc'had ? Farsus e oa.

Alies e c'hoarvez gant ar Vretoned meskañ evel-se latin gant o brezhoneg. Du-mañ, da skouer, e vez graet eus un teodeg, eus ur genou bras, ur "genou rapronobis". E Bro-Leon e vez graet ur ... "c'hlemavi" eus ur c'hlemmer.

Ha piv ne glev ket tro pe dro e "bater" ? An holl ivez a oar petra eo ur "Judaz", evel ma ouzont penaos :

Asinus sinum fricat, a zo daou azen o'n em lipat...

Ha p'eo gwir e oa komzet bremaik a "Venedisite", ret eo din lavarout penaos emañ bet desket ganin da gentañ :

"Bennsite Dobenus, nozegat kemenus menekat santori krijta krijti. Amen !"

Evelse e "patere" un Annaig kozh am eus anavezet mat. Ar

memes Annaig a daere meur a wech. Neuze ne zouje ket huchal war unan p' un all : "Sapre Santifisitur" !

Du-mañ c'hoazh, em eus klevet lavarout d'ar c'hloc'her : "Fri krok nostrom !" peogwir e oa kamm e fri, ha ma rae war-dro an iliz !... Ha p'emaomp gant an iliz, gant piv ne zegouezh ket leuskel, un tammig dizoujañs, ar bedennig vrudet :

"Dominus vobiscum
R... ar person en dour tomm..."

Ha moereb hemañ eus ar Baradozig, na brav e oa deut ganti he bomm latin, hep gouzout dezhi, pa zisklerias dimp :

"Emañ al loar en he gloria mundi !", da lavarout eo : en he bravañ tout !!

Hag ar frazennoùigoù latin a vez distaget gant tud ha n'ou-zont ger ebet eus yezh ar Romaned kozh. Gwir eo e vez klevet ar C'hallaoued o tistagañ mesk-ha-mesk gant o galleg, gerioù evel "footing, water-closet", ha me oar-me ? Hag i dizesk kaer war saozneg Churchill.

N'eus ket da souezhiñ, koulskoude, gant ar bleunioù latin e-touez brezhoneg bev ar bobl. Darempred ingal he deus bet a-viskoazh gant an iliz hag an ofisoù katolik. Ha tro pe dro ez en em sile komz pe gomz eus "brezhoneg" ar veleien e-touez ar brezhoneg gwirion.

Ha neuze, kloareged Vreizh. Ar re-se a veze, hag a vez atav, lorc'h enno o tiskouez o deskadurezh nevez-flamm, ha pa zeuent d'ar gêr e vakafsoù, e veze, hag e vez atav, leun o c'halon a blijadur o tiskleriañ dre 'n eñvor gwerzennoù Virgilius, ha pennadoù an Epitome... Ha skouarn ar bobl a zastum ar bruzunoù.

(niverenn 70)

GANT BEG VA C'HROG

Un emgann gounezet !

Setu Job o tont davedon, ur Job kribet-mat, gant ur porpant nevez-flamm ha botoù-ler du-pod. Ur Job a feson. Ur Job leun a levenez ; levenez bevañ ha kerzhout, gant daoulagad o ske-dif, hag ur mousc'hoarzh a ziskoueze pemp dant war-'n-ugent, d'an nebeutañ.

Ur gelaouenn dispaket en e zorn, din-me eo e c'harm a bouez-pann :

"Ha petra 'lavaren dit ? Gant piv emañ an trec'h ? Ganin-me, 'vel just, ganin-me, 'vel bepred !"

N'en em glevemp ket bemdez, ha n'eo ket souezhus an dra ; hogen deut eo ar maout gantañ, evit ur wech... Ne vern ! Job, avat, a gendalc'h dija, o kinnig din ar gelaouenn :

"Ha skrivet eo, moulet, e lizherennoù ken bras ha se... Lennit amañ, Aotrou !

Penn ur ministr bennak eus Bro-Frañs a welan, ha dindan, gant melloù lizherennoù : GOUNEZET EO EMGANN AN TREDAN !

"Ha lavarout a reoc'h c'hoazh sotonioù diwar-benn renerien ar Stad, Aotrou ? Ne vanko ket an tredan ; un dra a-bouez, sur ! Ha perak ne vefe ket gounezet un emgann all ganto bremaik ? Kredet o deus, stourmet hep aon, ha setu ar frouezh : un emgann gounezet, an trec'h a-du ganimp, gant ar re n'o deus ket kollet o fiziañs, evel ma rejout, te !...

- Ur paotr kaer a zo ac'hanout, Job, ha n'eus netra da guzhañ ouzh tud a seurt ganit ! Ya ! Sur on, evel doud, e vo

an trec'h a-du meur a wech gant paotred-a-c'houarnamant ken kalonek. Ne vanke nemet dour evit kaout tredan : ar ministr en deus gortozet e eur evit kregif gant an emgann, ha d'an deiz dibabet gantañ, setu an erc'h o teuzif war ar menezioù, ar glav o kouezhañ war an douar, -evel boaz eo, e sizhunvezhioù kentañ miz Meurzh !- ha leuniet hep dale al lennoù hag ar mirlec'hioù !...

- Gounezet eo an emgann ! N'eo ket diaesoc'h eget sa !...

- Selaou, Job ! Pa vo aet kuit diwar-dro hon aodoù listri-brezel ar Saozon, dre gaer pe dre heg, e vo gounezet ivez emgann an ed, pe an orañjez ! Ha gounezet e vo, en hevelap doare, emgann an houarn, pe an esañs, pe ar glaou, pa ne vo ezhomm outo, nemet evit labour ar peoc'h ! Ha neuze e teuo ur ministr all, hag a embanno, evel hemañ : "Gounezet em eus an emgann !" Ha petra 'zo d'ober evit gounit seurt emgannoù ? Gortoz ar glav, pa vo sec'h, gortoz an eost pulh, pa vo diouer a vara, gortoz ar peoc'h, pa vo brezel ! Ha kentañ a c'hellomp war dud ar gouarnamant evit gounit seurt emgannoù !..."

(niverenn 9?)

HOR BROIG

Hor Broig ? Hor broig a zo nebeut a dra, moarvat. Daoust ha n'eo ket hepken ar c'hornig-tro a oa bet laosket ganeomp, pa oamp yaouankik-flamm, e traoñ an hent doun, harp da leur ar marichal Sounn, e-giz ma veze graet anezhañ ?

En hor yaouankiz-flamm, e oamp brav, rak ur re vragoù a oa bet nevez lakaet gant ar c'hoshañ ac'hanomp hon daou.

Tri pe bevar droatad a hed, daou a ledander, troadadoù bihanik, a oa gant hon tachennig e-doug ar c'hae, a-benn d'ar wezenn evlec'h uhel he lein en avel vor, o kanañ laboused e-leizh, pep a vare, o kanañ deomp, pa ehane ar marichal gant e annev.

An hent a oa d'an holl, kement hag an dachennig. War behini n'hor boa, ni hon daou, tamm gwir ebet, douetus, her soñjal a ran, bremañ. Hogen, petra a ri gant ar vugale, ma n'emañ ket ar re-mañ mistri war bep tra, pa garont ?

Ar vistri edomp eta war hon tachennig.

A-wechoù e veze kempennet brav ganeomp, kompezet, palaret, pe skrabet ha gounezet gant ur biziad bennak a had, pe c'hoazh gant ur c'hozh kaolenn, pe gant ur c'hreunenn hepken, a ed-gwinizh du pe wenn. Ha stanket e veze d'ar saout gant bizhier, koadaj pe houarnaj dastumet e leur ar marichal, hag un horden-nadig spern pe draezh da beurstankañ.

A-wechoù all, e veze diskaret hon tachennig ouzhpenn an hanter anezhi e strad ar c'hleuz, gant ar glav, an taouarc'h hag an dour o ruilhañ e treid ar foz, pe diframmet gant moused ar skol o vont hag o tont, hag o pignat alies a-walc'h war ar c'hae, war zigarez un neizh pe ul labous da bakañ.

Ar re reutañ, kofoù tev dezho, a oa mab ar c'hloc'her, -kurust dilostet a veze graet anezhañ !- hag e vreur, atav d'e

heul.

Ar re-mañ a deue da ganañ kantikoù deomp, gregaj pe latin :

"Ar brosesion a vo graet !" a lavare ar c'hoshañ.

Hag "hon" Aotrou Person oc'h ober jestroù deomp, o kutuilh hon traoù, o sevel un aoter, ur c'hloc'hig o senañ gant e vreur, da lakaat ac'hanomp hon daou da blegañ war hon daoulin. Hag an aoter a veze savet ganto en hon tachennig, e toullig ar c'hae, tri maen en-dro d'an toull, unan plat war c'horre. Toull hor chatal-ni, da lavarout eo, ul logodenn bennak, moarvat, a veze savet ganeomp, pe ul loenig bennak all, evel ma vez e pep toullig, er bed holl. Pa ne veze ket ul logodenn eno, e veze ur vuzhugenn, da vihanañ, pe c'hoazh, penndologed a oamp bet o klask, pell a-walc'h alese, betek Poull Kerantraoñ ur c'hozh tamm skudell drailhet ganeomp, evit derc'hel anezho gant ur banne dour.

Nemet, daoust d'hor chatal, penndologed hag all, ar gurusted, ken lart o daou ha ken flour an eil hag egile, a gane o litanioù, betek ma ne chome ken na tachennig na tra ouzh ar c'hae, a-benn an noz.

Bec'h a veze goude-se, da adsevel an traoù hag hon douar, ha stankañ d'ar saout adarre.

Mat ! En ur zont en oad, douetus, rak ur re vragoù a oa bet gwisket din d'am zro, ur bodad ed eus ar c'haerañ a oa bet deuet deomp en hon tachennig. Gwelet a ran c'hoazh ur penn, ur penn hepken eus ar bodad-se, ur penn ed-gwinizh, outañ e-unan dreist ar re all, dispar, hir, tev, founnus, evel ma welen anezhañ, en ur vont gant ar c'hleuz, an Anjelus o senañ. Ar penn-ed seder hag alacuret, a vrafelle. Mont ha dont a rae en aer, a-zioc'h ar c'hae, evel ma vije bet o klask dareañ, moarvat, ouzh c'hwezh an traoù, evel ma vije bet o klask alan e vuhez, evel ma vije o pedañ, o pedañ.

Ha pedañ a rae bravoc'h, a gavemp-ni, eget "hon" Aotrou Person, gant e jestroù, e gloc'hig fall hag e lostenn. Nemet, amañ, pa gomzan c'hoazh diwar-benn "hon" Aotrou Person, dav din anzav em eus klevet, n'eus ket pell, ez eo deut, evel e vreurig, da zimeziñ, evit doare, ha bugale dezho, daoust d'o c'hloc'hig, d'o lostennoù hag all.

Hogen evit echuiñ, arabat din ankounac'haat ez en em gavemp ivez, pep an amzer, en tu all d'ar c'hae a c'houidore hon tachennig.

Alese, e welemp an douaroù betek an aod, hag, en tu all,
e welemp douaroù c'hoazh, douaroù ha douaroù, betek ar menezioù,
ha douaroù, ha douaroù c'hoazh, dreist ar menezioù, da vihanañ,
pa veze sklaer an amzer. Hogen, ne deve ket en hor soñj, a
gredan, e vije bet paotred, e nep lec'h, a-dreuz an douaroù-se,
hag o dije bet o zachennig dezho, gant ur penn-ed, d'an nebeutañ,
gounezet ganto.

Hor broig ? Nebeut a dra, moarvat ! Nemet, da bep hiní e
vroig, na petra 'ta !

(niverenn 53)

FANCH POULLAOUËG

HOR YEZHIG

War a leverer, hor brezhoneg a zo ur yezhig dister ha true-
zek. Evit gouzout gwelloc'h petra 'vern diouti, deomp c'hoazh
gant ar vugaligoù, mar karit : ar re-mañ n'o devez ket aon
rak ar vuhez, na rak ar wirionez zoken.

Friko a oa ganeomp e Mezmerien, un daou-ugent vloaz bennak
a zo. Friko piv ? N'em eus ket soñj ken, hag a-hend-all, kement-
se ne ra forzh. Alies a-walc'h e veze friko du-mañ, hag eüru-
sant : pa c'hoarveze ur friko, bragoù a veze gwisket da
unan pe unan eus paotredigoù bras dizonet an ti, hag ouzhpenn,
her gouzout a reot, ar friko, en amzerioù-se, a oa ur gouel
kaer, peogwir ar barrez a-bezh a gemere perzh er frikoù e
giz pe giz.

Ar friko a ziwane d'ar sadorn, ma n'eo ket d'ar gwener. D'ar
yaou war-lerc'h, e veze klasket an anduilhoù. Dre strolladoù,
an dud yaouank, paotred ha merc'hed, a zeus da gutuilh un
anduilhenn bennak e kement siminal a oa o vogedif ar vro. Gant
an dud yaouank e oa kri ha kanaouennoù leizh an ti, leizh al
leur, ha leizh an hent kleuz, ar weramm hag an avel, pa
loc'hent kuit.

Ni, ar vugale, ne gomprenemp grik, peurliesañ, en o c'hana-
ouennoù. Hogen gwelout a raemp ervat pennoù an dud, a oa
laouen a-walc'h, bep tro, daoust d'an anduilh da vezañ du-pod
ganto.

An taol-mañ, ouzh taol vras ar friko, meur a gant den, evel
just, en-dro dezhi, piv ac'hanomp, pe Berig, pe Yannig, pe ma,
a oa nevez deut en-dro diouzh kêr ? Parig ha Monig, moarvat.
Kerent, kar-tost deomp, a chome dalc'hmat e Montroulez pe e
kêr-mañ-kêr, en tu all da Beriz. Ar gerent-se a zeus, a-wachoù,
da gerc'hat unan pe unan ac'hanomp. Setu ma vezamp savet du-hont
bloaz pe zaou.

Ni, ar vugale, war-dro tri, pevar pe bemp bloaz ne oamp ken ; n'en em lakaemp ket da c'hoarzhin diwar goust ar gizioù farsus a gave d'an dud vras pe damgozh e oa ganeomp, pa erruemp en-dro. "Koutaio", a lavare va breurig, p'en doa ezhomm ur gontell.

"Chiaïl ! Chiaïl !" e lavare c'hoazh, p'en doa c'hoant... Pe boan-gof, mar kavit gwelloc'h. An dud a c'hoarzh. Hogen, ni ne gave ket deomp e oa tro da c'hoarzhin diwar goust kement-se. Nann, tamm ebet.

Ha n'eo ket ret moarvat, displegañ kalz prezegennoù, pa vez ar gwir boanioù, poan-gof hag all, ken anat.

Evelato, laouen a-walc'h e vezemp-ni, ar vugale, pa zeue davedomp hon tad-kozh Porzhtrein, un tamm c'hwezh un dra bennak dindan e fri. Kement-mañ ne c'hoarveze ket gwall-alies, hen anzav a rankan, ha Doue d'e bardono ! Nemet, neuze e konte deomp e oa barrek war deir yezh d'an nebeutañ. Er Spagn, pe du-se, e oa bet meur a wech, ur c'hoar dezhañ, pe ur voereb deomp mar kirit, dimezet ha bugale dezhi eno. Hag e tistage deomp : "Me an den !". Goude-se : "Kalaboka", a gav din e oa. En diwezh, lavarout a rae deomp ivez, e galleg, pe goulz, e oa c'hoazh un den anezhañ.

Gwir eo e oa un den hon tad-kozh ! Efñ eo, soñj mat em eus, a oa harp d'am breurig, pa glemmas, evel ma leveren bremaik, gant ar c'hoant hastafo. Tad-kozh n'eus ket bet labour 'benn tapout krog em breurig daoust d'ar re fall, a gendalc'he da c'hoarzhin, ha Perig pe Yannig, dibradet en aer diwar e skaoñ, a voe kaset er-maez alese, a-raok ma vije re ziwezhat.

Ar vugale vihan, hag ar re vrasoc'hig zoken, a soñj moarvat ne dle ket hor yezhig bezañ ken dister ha ken truezek anezhi, peogwir e welont ervat an dud laouenoc'h war o zro ha dougetoc'h, marteze, d'en em ziboaniañ an eil egile, dre ma c'hellont, pa vez hor yezhig a-viskoazh o vont en-dro ganto.

(niverenn 58)

FANCH POULLAUEG

HOR BEDIG

Ma oa hor broig brav a-walc'h, pa c'hellemp en em gavout, dreist-holl, gant un tamm labour bennak ; ma oa hor yezhig dereat a-walc'h, pa c'hellemp, dreist-holl ivez, laouenaat hor c'halonoù, em soñj emañ hiziv klask demañvorin penaos e troe ar bed ganeomp, da lavrout eo : petra oa hor bedig.

Seizh krennardig bennak e oamp, moarvat, er c'harter, evit ober ar gont, etre pevar ha seizh bloaz pep hini ac'hanomp.

An dud vrasoc'h hag ar re izeloc'h a rae bedigoù all : bedoù estren deomp, evel just.

Koulskoude, unanig estrededomp a veze degemeret mat a-walc'h, a-wechoù, en hor bedig. E-touez an dud-se, hon tad-kozh Porzhtrein a gonte, evel just, -an hini ho peus graet, en deiz all, un tamm anaoudegezh gantañ - hag ivez Aotrou Maer ar barrez. Hemañ a oa ur C'hernevod anezhañ, hag, ouzhpenn bezañ Maer ha Kernevod, medisin 'oa ivez war-dro ar chatal pe war-dro an dud. Ar pezh a zo sur, e welomp e teue a-benn, peurliesañ, da lakaat ar re glañv da c'hoarzhin. Ouzhpenn-se, pa oa gouest da intent ar saout, anat deoc'h oa barrek ganeomp : intent a rae karkoulz menazioù ar vugale.

En tu izeloc'h, ar marc'hed ne gontent ket, penevet Seza. Bremaik e vo, moarvat, un tamm kaoz diwar-benn houmañ.

Ar re yaouank ne gontent ket muioc'h. Me, er bidoc'h, a-boan ma vezen gouzafvet ; met lorc'h ennon, evel just, pa veze graet "paotrig ar saout" ac'hanon.

Piv eo a oa ar mestr ganeomp pe warnomp ? Dalc'h ebet war gement-se. An neb a gare a oa ar mestr. Ar re all a oa boas da sentañ etav, ha da vale war roudoù er mestr, hap marc'hata tamm. Ha bale a raemp dalc'hmat kement, ha ken na 'z ae an traoù

da fall.

Gwechoù ez aent mat...

... Glaodig ar c'higer eo -e dad a oa Glaoda, hag e lazhe ar moc'h- a lakaas ac'hanomp eta da vont e-barzh bagig Kabell-ploum. Hemañ a oa an treizher. Kabellploum a veze graet anezhañ, peogwir oa boas da chom digabell peurliesañ, hag e benn chouchet gantañ ha... moal anezhañ evel ur ganetenn nevez-flamm. E roefoù a oa harpet ouzh moger ti Bleizi, ar baraer. Hemañ ne veze nemet ar ger-se gantañ : "Bleizi !" ha "Bleizi !" Nemet ar ger-se ne lakae ket anezhañ da vezañ trumm gant al labour. Suterezh ar politik an hini a oa gantañ, war a lavare an dud. A-hend-all, hini ebet ac'hanomp, moarvat, ne ankounac'haio a-hed e vuhez an daolenn "bleu-blanc-rouge" Fachoda, a baperenne ar voger dirazañ, pa veze trouc'het e vlev dezhañ gant Bleizi. Rak Bleizi a oa perukenner ivez.

Hogen n'eo ket aze emañ an abadenn, pe ar boan, pe ar blijadur geneomp, an taol-mañ.

Diskoulmet ar bous diouzh ar c'hae gant Glaodig, ha ni o vont en ur luskellat ar vagig, martoloded yac'h ac'hanomp.

Nemet pezh a zo, e devezhioù ar reverzhi bras e oamp d'an ampoent, hag avel vat a oa, ouzhpenn se. Bremaik, pa soñjemp, ar vagig a heje kalzig, met, pa selljomp pishoc'h en-dro deomp, pell ac'hanomp oa ar c'hae hag an douar, pe hor broig kaezh !

Hag ar vagig strinket ha distrinket ouzh an eil gwagenn d'an hini all, o kouezhañ pounner en touloù dour ar mor, dibradet en aer prest goude, hor bagig en hent, ha war-eeun war-du ar C'herreg Du !

A-benn ur pennad, ne glevemp mui na freuz ar gwagennoù, na trouz an avel o c'hwezhañ skrifus warno, na zoken ar C'herreg Du o kanañ didruez ouzomp, dre ma tostaemp. "Mamm !" - "Va mamm !" hag all a oa geneomp, ha deoulegad bras dibikouzet, moarvat, gant an daeloù. An daeloù a ruilhe puilh betek touloù hor friodigoù a roc'he start, ha betek e-barzh hor genaouigoù, eus a belec'h e save kri ken ha ken... en em vouzarañ an eil egile.

E-keit-se, ar c'hrabanoùigoù a oa krog dalc'hmat ouzh bourzh ar vag pe ouzh he skinier. Lod ac'hanomp a oa diskaret mask-divesk war o revr, e c'hellit kredif.

Ur pennad brav e padañ ar c'hrogad ; meur a eur horolaj. Da vihanañ, ouzh horolaj hor bedig.

Jerom ha Visant, eo, a gav din, a astenn o divrec'h er-maez ar vagig d'hon diwall diouzh ar C'herreg. Ar re-mañ a zaoulamme davedomp evel loened iskis, pennoù bizhinok dezho, ha rolladoù spoum-bavouz o tarzhañ, un estlamm, a bep tu d'o begoù forn. Jerom ha Visant a oa dislivet betek o bizied, a welin keit ha ma vevin, gwenn-kann, hag o krenañ a-is ar Garreg.

E-keit-se, diouzh an tu all, ur mell gwagenn spontus a save a-zioc'h hor bagig. Met ar Garreg Zu, en diwez, a wintas en aer e-biou deomp. Diouti evel ur varrenn dir, ar froud bavouz a zirede gant tizh diouzh he geol, en devoa argaset ac'hanomp pelloc'h. Ha goude ur mell gwagenn all a vountas hor bagig, dreist lost ar Garreg en ul lenn-vor goudoret. Eno ar vagig a dec'has drezi hec'h-unan war-du an aod.

Koulskoude, a-raok ma touaras, daou ac'hanomp, Visant ha me, penaos ? N'on doare mui, a gouezhas en dour. Ne ouiemp ket neuñ. Met goude-se, oamp barrek war gament-se evel ar re goshañ ac'hanomp.

Skandal a oa bet, koulskoude : ur votez bennak eo a oa bet kollet, ha ne gavemp ket anezhi en-dro.

Un dro all, e oamp war hent ar Forestoù-Izelañ ha gwall-grog gant ur frapad emgann bihan, a-enep Krennarded Porzhtrein. Ar re-mañ a oa hon enebourien reut evel just. Hag an taol-mañ, ne oa ket bet a-walc'h gant ardoù, kri ha bonedoù en aer. An taouarc'h, hag ar mein zoken, a strinke diouzh un tu d'an tu all, pa zegouezhas Seza.

Seza n'oa ket koshoù h'aget ar c'hoshañ ac'hanomp. Ha mamm. Marn a veze graet anezhi, a oa intañvez ha paskatarez.

Ne veze gwelat namat gant ur boutag war he fann, o vont, hag o tont, d'an aod. Seza, petra bennak ma oa pasour, sañset, hag ur fri krok ha barr dezhi, a ouie mat ouzh an dud. A bep

seurt troioù kamm a c'helle ober hounnezh. Memes tra, oa degemeret mat gant an holl. N'oa nemet al Lagad-Duig, evel ma veze graet anezhañ, ha ne oa ket mignon da Seza.

Daoulagad Seza a dizhe a-dreuz d'hor c'hreiz-ni, kement ha ma vezemp dirazi.

"Deuit paotred !" a lavaras Seza. Ha ni : "Kenavo !" d'hon enebourien Porzhtrein, nemet hep diskleriañ dezho, evel just, edomp o vont da gilañ gant ar c'henavo-se. Biskoazh, dre ma 'm eus klevet digant unan anezho abaoe, n'o doa bet hon enebourien Porzhtrein kement a aon razomp. Ne ouient ket mui da belec'h e oamp aet da guzhat, ha gwall-nec'het e oant o klask gouzout a belec'h e teuje, bremaik hag adarre, an taouarc'h hag ar mein da gouezhañ war o c'hein.

Ni, ne soursiemp ket ken ganto, d'an ampoent. Ur frapadig komz a oa bet, a-benn neuze, etre Seza ha Glaodig, pe etre Seza ha Jerom, pe etre Seza ha Krennig. Hemañ a oa ur c'hanfard all a-zoare, nemet moan-moan eus an a-dreñv, kontrol da Jerom, evel ma ouezit.

Ar pezh am eus soñj mat eo ez en em gavjomp, prest goude, e-kichen ti al Lagad-Duig, ur maen e pep dorn gant pep hini ac'hanomp.

Al Lagad-Duig a oa ur stal gantañ war ar porzh, stal ar pouezerezh, da vihanañ. Ur mell lunedoù du a veze gantañ war e fri tev ha ruz-tan ; setu ma veze graet Lagad-Duig anezhañ. Ar gwashañ ma oa, e stal, pe e vurev, a oa e penn an hent bihan da vont da di Seza. Bep tro ma tremene Seza, e welemp ar Paotr Du o sailhañ er-maez eus toull dor e vurev hag o redek, evit klask abeg ouzh Seza. Ha, gwechoù moarvat, e c'helle pakañ anezhi er straed voan.

Hogen bremaik e vo echu ar c'hoari. Rak renket e oamp etal ar prenestr en tu a-dreñv d'ar burev. Pa glevjomp-ni Seza o krial : "Aïou ! Aïou !..." evel ma oa bet intentet, ar mein a darzhas a-gevret war ar prenestr, ha lagadoù du ouzh ar prenestr, forzh pegement ! Ha ni ha tec'hout dre ma c'hellemp, e zaoulammoù ruz, e c'hellit krediñ ha tra ma loc'hemp-ni, ar gwer a gouezhe war an douar, ha seniñ a raent sklintin evel ma vije bet an tannoùigoù anezho o c'hoarzhin.

Droug ebet ne c'hoarvezas, goude-se hag e-pad pell amzer, na gant Seza na ganeomp.

D'an abardaez, Cheun ar C'halvez a zeuas da lakaat karoennoù

nevez ouzh ar prenestr. Diouzh ar c'haeoù, tro-war-dro, e sellemp c'hoazh ouzh al labour-se.

Eus a belloc'h e welomp bremañ hor bedig. Pelec'h emaoe-h-c'hwil, Seza, Glaodig, Jerom, Krennig, Visant, Perig, hag all ?

Lod ac'hanoc'h, divroet, pell 'zo, a zo o chom, her gouzout a ran, betek en tu all d'ar bed-mañ, ma n'eo ket er bed all, an Aotrou d'ho pardono !

Met, diskleriit deomp, mar plij, kement-mañ, hag ar c'hentañ ar gwellañ : daoust hag unan pe unan ac'hanoc'h a zo bet en em gavet tro pe dro abaoe en ur bedig bennak all, lec'h ma veze lezet ar vugale da c'hounit suroc'h an tamm nerzh-kalon a zo ret da vont gant ar vuhez, ha lec'h ma veze lakaet ken trumm an urzh wirion pe ar peoc'h don da ren ?

Ha kavet hoc'h eus ur bedig all, e lec'h ma veze an holl ken eürus, e gwirionez, hag en hor bedig ?

(niverenn 68)

SKOL BEG AVEL

Hor skolid n'emañ ket ken du-hont e Penn ar Ru, war uhelenn ar Beg Avel. Pa gomzan diwar-benn ar Ru, ret eo din disklêriañ ne oa nemet ar Ru-se er c'harter ; ur c'hozh ti-plouz bennak savet renk-direnk ouzh an dorgenn.

Penaos eo bet diskaret hor skolid ? Deuet eo an hent-houarn er vro dre eno, gant un toull spontus graet e douaroù ha kerreg ar Beg Avel, da lakaat ar mirc'hed du da redek e-treid ar mor. Lod a c'hellfe menegiñ darvoudoù all marteze, met gwalet e vo pelloc'h pe ne vo.

Ar pezh a zo, en ampoent, eno e vezemp degemeret gant an eontr Jeff, moereb Anna, Zig, o merc'h (Sezaig oa hec'h anv, ni a rae Zig anezhi !) Aelez, ar plac'h (e Bro-Gernev e veze lavaret : ar vatezh) ; met Aelez a oa re dost d'an aelez, a gredemp, kement ma ouie ijinañ kofchennoù dudius d'ar re da vihanañ a c'helle mont da sikour anezhi da skotañ ar jid-houarn hag ar skudilli pe da lakaat ar botoù-ler da lintrañ. Pato, ur c'hi gouiziek ha Jakou, ur c'hakatoa, a gavemp c'hoazh eno, an eil hag egile oc'h ober skol deomp ivez bep an amzer.

Nikun, a gredan, ne oa droug-spered ebet d'e ambroug war an hent a'z ae d'hor skol, nemet un drovezh, Monig hor c'hoar, a gav din. Hogen n'oa ket ret kontañ kaojoù dezhi : d'he zro gentañ edo da vont di ; setu ne ouie ket c'hoazh he dije bet, an taol-se, d'an nebeutañ, un imaj mat da zebriñ. Ya, bugale, imajoù mat da zebriñ a oa e skol Beg Avel ! Imajoù jelatin fall oant, her gouzout a reomp bremañ, met n'edomp ket figus. Ha mat-tre a gavemp an imajoù-se dre ma vezent livet brav ha flamm.

Diouzh ar beure, pa 'z en em gavemp, d'ar ebet, a gav din, d'al liorz, nemet ledan-ledan a vije bet an nor-se. En ur

c'hogn, e oa ur wezenn bennak uhel-uhel, ha dindan, skifvier beuz druz ha c'hwek, patati enno pa glaskemp azezañ warno. "Pelec'h emañ eontr Jeff ?" a ziskanemp-ni, pe ur rimadell all a-bouez-penn.

Peurliesañ, gant Pato o prederiañ en e gichen, eontr Jeff a oa pe war-dro ar paramantoù, pa veze brav an amzer, pe war-dro Gugus ha Nenes, du-hont en disglav, dindan an doennig astennet war o fennoù.

Ar vrasigell, ar c'herdin a-istribilh, an delez hag all a 'z ae en-dro ganeomp ken na 'z aent, ha n'oa ket ret deomp kaout poan-spered a-raok kregiñ ganto. Da lavarout eo ne veze ket graet kalz prezegennoù deomp. An eontr, a-wechoù, a rae e-unan a bep seurt troioù war-dro ar paramantoù, met, anat oa, evit kaout plijadur eñ ivez.

Martolod oa bet. Bep noz c'hoazh, pe abred bep mintin, ez ae da besketa gant e vagig hag a oa "Kenavo Jeffig" hec'h anv. Tro ar bed en doa graet ivez eontr Jeff, meur a wach, ha n'en doa ket en em gollet, daoust ma ne gomze nemet brezhoneg ouzhimp.

Pa ne veze ket eta war-dro ar paramantoù, dre vras e veze war-dro Gugus ha Nenes, ur sac'had pilhoù oc'h ober pep hini eus ar re-mañ. Pennoù Aotrounez a oa outo, graet ivez gant sac'hadigoù pilhoù all, genaouioù bras digor livet dezho war o dremmoù, frioù ruz ivez, ha daoulagad ront ha gwenn, gant ur pik du e-kreiz pep lagad. Met arabat deoc'h krediñ e oa dizrouk gant kement-se Gugus ha Nenes ! Kalon a oa en o c'hreiz : un tamm orjal dir, stenn-distenn moarvat. Pa veze sanket ur gwall daol penn en o sac'h-kreiz, brañsellat a raent, ken na vrasellent... da reif deomp kement-all, da lavarout eo taolioù penn ! ... Nenes a oa ar reutañ, da vihanañ pa veze an eontr Jeff en e gichen. Ne ouezan ket mat-mat penaos e rae an eontr, met nerzh ha lamm a roe, pa gare, da Nenes da skeiñ ganeomp didruez.

Pa vezemp skuizh gant hon drouk-speredoù, da lavarout eo pa vezemp dihunet pe divorfilet da vat, ez aemp betek an ti-skol. Ur c'hozh ti ne oa ken, marteze, met kaer ne veze ket gwalet gant ar bleunioù hag an delioù glas.

Un toull bras evit antren, ha kerkent son ar piano a veze klevet, nemet fall-fall e vije an traoù, war-dro eno, evel ma c'hoarvezas, ur gwener. An darvoud-mañ a vo kontet ganeomp diwezhatoc'h.

Ar piano-mañ ne oa na skrijus nag enoeus da glevet. Ar c'hontrol eo : mont a rae propik hag a-gevret ganeomp, pa vezemp o kanañ gantañ, daoust ma ne oa ket otomatik tamm ebet anezhañ.

Met n'emaomp ket o kanañ brav c'hoazh, rak er c'houlz-mañ, ni e toull-dor an ti-skol, ne welemp nemet ar gwerinier o luc'hañ ouzh dor ar sal. Ma n'hoc'h eus ket gwelet hoc'h-unan ar gwerinier ruz ha glas-se, ne c'hellot biken gouzout petra a c'helle bezañ dispar en hor skolig-ni.

Gwir eo, Aelez a veze aze ivez ganeomp ; hag hor botoù a rankemp tennañ ha renkañ brav an eil e-kichen an hini all, hag harp d'ar rummoù all.

Er sal, e kavemp moereb Anna ha Zig, ha poent ar pedennoù a errue, goude ur frapad gourc'hemennoù kenetrezomp, a-dreuz hag a-hed, da c'hedal ar vugaligoù a-ziwar-lerc'h.

Kanet e veze ar pedennoù. Hag e c'hellit soñjal e vezent kanet !...

Met ampoent ar pedennoù krisoc'h a zeue, prest goude. Alan a chome c'hoazh ganeomp, hag ar rimadelloù-mañ a dregerne er sal, ken na vezent klevet diouzh a-bell moarvat :

"Daou ha daou a ra pevar,
Daou re daou a ra pevar.."

Kement-all, hag all, hag all...

"Krisoc'h eo, a lavare deomp moereb Anna, ar pedennoù-mañ. An Aotrou Doue a zisamm ar pec'hedoù, va bugale", emezi, "met ar marc'hadour pe an diaoul ne bardonint ket deoc'h, mar faziit war ho kontoù. Paolig a zisammo ho yalc'h, ha n'eo ket ho koustiañs an hini eo !"

Zig a glaske ivez diskanañ deomp kement-all, met Zig a oa ur plac'hig ken koant, ma ne c'hellemp ket kredañ e c'hellfe-hi bezañ kriz e gwirionez.

(niverenn 72)

REUN

GWECHALL GOZH, KENNEBEUT,
NE VEZE KET DRUZ AR PEURIN

Kemenerien an amzer gozh a oa tud iskis, an holl her goar : flasterien, liperien, goaperien... En ur ger berr, tud diaes da gaout ha ken diaes all da ziouerout !

Unan a oa du-mañ hag a veze graet Lah anezhañ. Ur maout a gemener, eveljust, hag un tanfoeltr a zen. Doue d'e bardono ! Div nadoz a veze gantañ en e sac'h lien : unan hir hag unan verr ; unan nav gwenneg hag unan c'hwec'h gwenneg, an "hini reut" hag an "hini dreut", evel ma lavare ; ken lezirek an eil hag eben, pa vo displeget mat ar wirionez...

"An nadoz hir pe an nadoz verr ?" a hope ar c'hemener, a-barzh pignat dreist an treuzoù. "An nadoz c'hwec'h gwenneg pe an nadoz nav gwenneg ? Boulc'hurun ! Traoù a vo pe ne vo ket ?"

Un orin penn-da-benn !

War ar maez, d'ar c'houlz-se, -n'eus ket c'hoazh keit-all 'zo, peogwir va mamm-gozh an hini eo he deus kontet din kement-mañ- ne veze ket lidet bemdez fest an hoc'h. Na zoken ur wech er miz. Dibaot a chervat. Boued krampouezh i-tu (ed-du) diouzh ar mintin, hag un tamm bara 'mann da stanañ war e lerc'h, -ne veze ket anv eus banneoù kafe- avaloù-douar poazhet en dour da verenn, yod kerc'h pe soubenn an tri zraig da goan, ha mat pell 'zo... War ar c'hig, dreist-holl, e oad pizh. Pa veze un tamm er soubenn, e oa boas ar wreg pe ar vatezh da droc'hañ un drailhenn da bep hini, ha da sammañ ar plad diwar an daol, buan ha buan, dreist frioù an dud. Ne veze ket goulennet diganeoc'h hag eñ ho peze bet ho kwalc'h... Ur c'hiz eus an divalavañ !

Aet eo hi d'an traon, a drugarez Doue ! (Marteze, e ranko bezañ savet adarre en he flomm, ken dibaot all eo deut ar c'hig da vezañ en hon amzer-ni !).

Un deiz eta (e konte din va mamm-gozh), edo Lah o labourat

e Tiridoù. Gant an "hini dreut" ! Falc'hadeg oa ivez an deiz-se. Ha dont an dud da glask o merenn. Kig er soubenn, evel-just. N'eo ket abalamour d'ar c'hemener, abalamour d'ar falc'herien ne lavaran ket. Ar wreg, ur vaouez pizh, ken na flaerie, a droc'has un drailhennig da bep hini, -hervez ar c'hiz- hag a sammas ar plad raktal. Paotr ar veskenn, avat, a gavas gwall skañv e damm. Setu eñ neuze da gostezañ e benn, a-gleiz hag a-zehou, da zispourbellañ e zaoulagad ha d'ober ur bern ardoù.

"Ma ! Paotred", emezañ, a-benn ur predig, d'ar falc'herien, a chome alvaonet outañ, "m' eus aon me 'zo aet fall em gweled 'baoe ar mintin. Emberr e vo dav 'walc'h din dougen lunedoù..."

Sevel a reas un tamm brav a skrign en-dro d'an daol. Nemet flemmet e oa bet ar wreg gant komzoù ar c'hemener. Betek bev he c'halon.

"Lezit da gas", 'soñje-hi, etre an div varenn. "Kemener-kemenerig ! A-benn koan e tegasin ar pare d'ho taoulagad, hag e krennin deoc'h ho teod war un dro. M'ho tesko d'ober goap ouzhin..."

Souezhet-bras e voe ar falc'herien da goan, pa weljont pe-seurt tamm kig oa lakaet d'ar c'hemener : ken ledan oa ma c'holoe e damm bara penn-da-benn. Nemet tanv oa ivez, siwazh ! Ne oa ket bet ar wreg evit trec'hif war he fizhoni. Ken tanav, moarvat, hag un delienn gistin !

Hag hi da c'houlenn ouzh Lah gant ur vouezh hegarat :

"Asa, Lah ! Daoust ha gwellaet eo un diotaj bennak d'ho taoulagad 'baoe merenn ?" Ar c'hemener ne chomas ket a-ramp.

"Un diotaj bennak ? Merc'h paour ! N'oufec'h ket kredif", emezañ. "Da greisteiz, n'oa ket 'vit "remerkout" va zamm kig war va zamm bara. Henozh avat, e "remerkan" fraes-tre va zamm bara a-dreuz va zamm kig !"

(niverenn 58)

JAKEZ RIOU

TERAMJI WAR AR BLASENN

Job a zegouezhas dezhañ mont d'ober un droad da Paris. Derc'hent deiz e gimiad, segredour an ti-kêr a lavaras dezhañ :

"Peogwir e vi warc'hoazh e Paris, kerzh d'ober un dro betek Kambri an Deputeed. Warc'hoazh, eeun-hag-eeun, e vo reuz, ur reuz spontus gant votadeg al lezenn aozet diwar-benn Breizh. Brudet e vo an deiz en istor hor bro.

- Burzhudus eo, avat !

- Deputeed Leon ha Kernev, Treger ha Gwened, a wisko holl chupennoù brodet o c'hanton, o zokoù ledan ha botoù koad o begoù lemm. Unan zoken a guzho ur morzhol en e grubuilh hag ... Gwad a redo !"

Kemer a reas an tren kentañ.

E Paris, Job a c'houlennas hent ar Gambr. Ur policeman a lavaras dezhañ :

"Du-hont !"

Hag e tiskouezas an tu enep.

"An tu dehou a ziskouez", eme Job, "ha segredour an ti-kêr en deus lavaret din kemer an tu kleiz."

Gant aon da goll amzer, ha gant aon d'en em goll, Job a gemeras un taxi.

Setu-eñ degouezhet dirak ar Gambr, ti al lezennoù, ti an urzh hag ar furnez...

Un niver bras a dud a c'hortoze ma vije digoret an nor. Job a en em lakaas war-lerc'h an hini diwezhañ. Gwisket e oa e-giz paotred e barrez. Parizianiz eta a zistroe o fenn da c'hoarzhin goap outañ.

Ur policeman a zeuas d'e gavout ha da lavarout dezhañ :

" It pelloc'h ! "

Job ne gomprenas ket. Hogen, sentif a reas, pa ne c'helle ket disentif.

Petra 'c'hoarveze du-hont, war ar blasenn vras ? Un niver bras a c'henaouerien a selle hag a c'hoarzhe.

"Bravo ! Bravo ! Les Bretons ! Bis ! "

Job a yeas da welout. En em lakaat a reas a-dreñv ar renkoù diwezhañ, hag, en ur zic'hougifiñ hag en ur sevel war beg e dreid, e c'hellas merzout.

E-kreiz kelc'h an engroez, e welas skoaz-ouzh-skoaz, ur renkennad gwazed, darn war-dro daou-ugent vloaz, ha darn all tost da gant, kroummet, tort, luch, moal lod anezho, ha lod all paotred ampart ha faro.

"Pelec'h emamp amañ ?" a c'houlennas Job.

"Sur la Concorde" a voe respontet dezhañ.

"Piv eo ar re-se ?" a c'houlennas Job, en ur ziskouez ur renkennad gwazed, en o sav e-kreiz ar c'helc'h.

"Deputeed Breizh !" a voe respontet dezhañ.

Rimplañplañ un taboulin hag un taol kleron a dregernas er blasenn.

Kement den a chomas simudet.

Deputeed Breizh a savas o selloù d'an oabl, a reutaas o arzelloù, a reutaas o feultrin, spilhet warno kroazioù ha metalennoù nevez-flamm. O divrec'h a oa stardet a-hed o c'horf, o daouarn a oa digor, ar palvoù troet d'an diabarzh, hag ar biz bihan war gri ar bragoù. Ur c'hannad a oa kroget da lavarout :

"La discipline faisant la force principale des armées... il importe..."

- Da c'henou, genaoueg ! N'emaomp ket er c'hazarn, amañ."

Ar paotr dievezh a reas ul lamm spont. Un archer a oa dirazañ.

"Sioul ! "

A-rampadennoù hir, un denig kozh, penn gwenn, barv ha blev, a dremenas dirak ar gannaded, un tog lintrus war e benn, ur skourjez en e zorn, daou lagad kounnaret en e benn.

"Piv eo an istrogell-se ?" a c'houlennas Job.

- Poincaré", a voe respontet dezhañ.

- Ha petra 'ra aze ?" a c'houlennas Job.

- Revue !" a voe respontet dezhañ.

Ur c'hannad a zegouezhas dezhañ mousc'hoarzhin.

Poincaré a chomas a-sav dirazañ, a sellas outañ gant selloù kasaus. Sevel a reas e skourjez. Kerkent, avat, ar c'hannad a ganas a-bouez-penn, ken na tregernas ar blasenn Concorde a-dreuz hag a-hed, ar "Marseillaise".

"Kannad leal out", a lavaras dezhañ Poincaré. Hag e reas ur flourig dezhañ dindan e chink. Hag e stouas e skourjez. Hogen, echuet ar "Revue", ne bare ket ul levenez dibar war dremm askornek Poincaré.

"Foutu omp !" eme ar gannaded an eil d'egile. Ur c'hannad a hopas, neuze :

- Vive Poincaré ! "

Ar re all a gemeras skouer warnañ, nemet raouliet e oant, ha ne deuas er-maez diouzh toull o gouzoug nemet ur "Vive Poincaré" mantrus.

Al Lorenad Meur a yeas droug ennañ. Tennañ a reas tennoù gant e skourjez.

Chiappe a hopas dezhañ :

"Faciem Feri ! (1)

- Petra 'lavar ?" a c'houlennas Job.

- Face de bête !" a voe respontet dezhañ.

Hogen, dibradet diwar an douar gant avel ar spont, deputeed Kernev, Treger, Gwened, an Naoned, Roazhon, a reas lammoù meot war ar blasenn. An eil a gemeras e biz bihan egile, hag e rejont holl ur gavotenn a enor en-dro da bilerenn al Louksor en ur ganañ :

"Me eo ar Serjant-Major, o tistreiñ eus an arme..."

" - Ur ganaouenn all !" a hopas Chiappe.

Hag ar blasenn veur a dregernas gant :

"Allons, enfant de la Patrie,
Le jour de gloire est arrivé..."

Goude ma voe echu an dafñs, e krogas an deputeed gant c'hoarioù breizhek. Fañch a lammas gant ar gordenn ; Jakez a redas gant ar ruilh ; Yann ha Per a oa kroget da c'houren, e-doug m'edo Aristid o vale war e zaouarn hag oc'h ober gwezenn-ber.

"Brudet e vo an deiz en istor ar vro", a soñje Job.

Parizianiz e lavare :

" - Cà c'est des bath mecs, ces bretons !"

Edo an heol o vont da guzhat.

Un den a zeuas da gavout ar pezh mell Lotaringiad Bras, hag a lavaras dezhañ :

"Mestr ! Votet eo al lezenn."

Ha setu !

Ar c'hwiboned kizellet war bilerenn al Louksor, o deus c'hoar-zhet, pa ziskennas an noz.

(niverenn 25)

(1) - Faciem feri : e latineg = skoit ouzh o fas !

SATK

AR PREFED, AN AOTROU MAER, HAG AN ED

E ti Lan ar Marichal ez on en em gavet, an deiz all, er vourc'h.

An Aotrou Maer a oa eno gant un aotrou all. Lavaret e voe din e oa hemañ an Aotrou Prefed, deut du-mañ gant un dornad aotronez all eus e vurevioù, da welout penaos e oa kont gant ar vro, ha dreist-holl, gant ar bevañs.

Anzav a rae an Aotrou Maer n'oa ket ker fall ar bed ganeomp war ar maez, ha gant hor c'henvroiz, er c'hêrioù. Ha lenn a reas ul lizher a oa a nevez bezañ bet kaset dezhañ gant e verc'h-kaer eus an Naoned :

"Ur sac'h goullou ne chom ket en e sav... Ar vugale amañ n'o deus ket hanter da zebrañ... N'eus ket a-walc'h a vara... h.a. h.a.."

War e du mat e oa ar Prefed, moarvat.

"Ur wall gudenn, emezañ, eo kudenn ar bara. Ma, ne welan nemet ur respont hag un ali da reiñ deoc'h, ha deoc'h d'e reiñ d'ho tro, da gouerien ho kumun... Gounizit, gounizit ed ! Dindan ed, hoc'h holl zoueroù disub !..."

Ober a rae ar Maer un hij d'e benn.

"Va digarezit, Aotrou Prefed", emezañ. "Er vro-mañ, resped deoc'h, ne vez ket gallet lakaat ar c'haoc'h saout da ober tan en oaled. Amañ, ha dre vras, e Breizh, pa vez ed, hag ed puilh a-wechoù, n'eo, koulz lavaret, nemet diwar an tramp hag al ludy a vez roet d'an douar.

Hag ar Maer ha displegañ d'an Aotrou, mar en doa da vediañ,

an eil bloavezh da gas an hini all, 27, 28 kental dre zaou zevezh arat, goude turiañ an douar an donañ ma c'helled hag e gempenn, a-hed ar bloaz, eveljust, ne zeue a-benn da gaout an eost-se nemet dre ma ingale, war bep daou zevezh arat dindan ed un dek sac'had a skorioù, un daou pe dri sac'had a silvinit, hag en diwezh, un daou pe dri sac'had all a ludu-holen.

"Ar bloaz-mañ, avat" eme ar Maer, "gant ken nebeut a ludu hon eus da reif d'hon douar, a-boan ma vo an eost an div drederenn eus ar pezh a veze a-raok ar brezel. Ar bloaz a zeu, a-boan ma vo an hanter..."

Ha ma vefe gounezet div pe deir gwech muioc'h a zouaroù dindan ed, marteze a-walc'h e vefe dastumet 5 000 hordenn elec'h 2 000 ; ne vo enno, avat, a c'hreun hag a blouz, nemet an hanter, ma n'eo ket ar palevarzh.

"Aze emañ an dalc'h : hep tremp, eost dister ! Penaos ha perak emao'h, neuze, gant ho tiskan dre ar vro : "Gounizit ha gounizit ed !" pa ne roit deomp na ludu du na ludu griz ?"

Ret eo kaout tud er burevioù, a dra sur. Hogen, ret e vefe dezho gouzout labourat gant o c'horf, hag ober ar c'hemm a zo etre ur foenneg hag ur menez-lann, a-raok goulenn diganeomp gounid ed, pa n'int ket evit reif dimp kement a zo ret da sikour hon douaroù.

(niverenn 97)

M. EN UVEL

ARDEU PIER LEATHRENK, TAD-KOH ME ZAD-KOH

Rakskrid

N'hoc'h eus ket klevet komz du-mañ ha du-hont eus Pier Leathrenk ?

Nann ! Arsa, n'eo ket c'hoazh erru neuze e vrud ganeoc'h du-se ; neoazh, un nebeut 'zo e c'hoarie bouloù e Kêrdinou !

Evidon-me, gwerso-bras e anavezan e droioù-kamm. Tad-kozh ma zad-kozh e oa, ha sellit, enor e lignez.

Pier Leathrenk a oa genidik eus Bro ar C'hallaoued. Desket en doa a-vihanik ar galleg c'hwek ha tanav a gomzer er vro-se. Hag evelse, paotr yaouank, n'anaveze tamm brezhoneg... Fall an traoù evitañ ! Rak e soñj mat a oa priediñ er vro vreton.

Goude bout bet o klask er pennc'hêrioù tro-ha-tro, eñ a choaz Anna Tulzen, ur goantenn a verc'h, en he naontek vloaz. He zad a zalc'he tachenn e korn ar c'hoad, tostik-tre da goad Brangoulou. Ha merc'h nemeti, an dachenn a chome ganti a-benn war-lerc'h he eured.

Eta, Pier a gav un tiezherezh a feson hag un dachenn war ar marc'had.

Ha setu euredet an daou zen yaouank.

Diaes e oa bet dezho en em gompren en deizioù kentañ, met gant sikour ar garantez ha spered lemm Pier, an traoù a bleanae bemdez. Neoazh, da bell war-lerc'h e treskile Pier gant e vrezhoneg.

Plijadur a gavent ivez war-dro o zachenn. Douar blot ha

c'hwennet mat hag a zouge bloavezhiad druz ha legumaj an dibab. C'hwec'h buoc'h er c'hraou gant ul leue pe zaou.

Ur jav yaouank ha kreñv a labourer o farkeier. Daou bennmoc'h hag a yae unan anezho bep bloaz en o charnel.

Yer o redek 'barzh al leur, dre al liorzñ hag ar parkeier, evit frikotat d'ar sulioù bras.

En un ti ken paket, bugale ne vankent ket. Tri faotr hag ur plac'h he doa bet Anna...

Setu aze, e berr gerioù, buhez tad-kozh ma zad-kozh. Ha bremañ, deomp d'e ardoù.

1- SAOUT PIER LEATHRENK

Tostik-tre da goadig Brangoulou e oa eta douareier Pier Leathrenk. Ha liesoc'h-lies e kave an tu e vuoc'hed da amezeñ dindan ar c'hoad. Groñs e oa difennet kement-se gant an dudjentil, hag ur gouarnour soutil a eveshae war ar c'hoad.

Bugulien ampart a veze neoazh bepred gant Pier. Met atav ar saout a fourche en trepasioù, a sailhe dreist ar girzhier. Warlerc'h ar gentañ e rede kentizh ar paourkaezh bugul. Pa oa kavet gantañ, eñ he distroe d'ar prad. Ha ne wela mui hini e-barzh, holl e redent dindan ar c'hoad. Neuze e ouele, e vleje a-forzh. Hag un deiz pe un all e kuitae tachenn Bier.

Pier a c'hopre unan arall. Ha ne veze na gwell na falloc'h an traoù. Al loened a vourre re peurif lus ha delioù glas dindan an tailheris. Ha repu ivez a oa dezho diouzh an heol tomm.

Evit sikour ar vugulien da glask o buoc'hed, Pier a stagas ur c'hloc'h dindan goug pep loen. Fall soñj ne oa ket ; met estroc'h eget ar bugul a gleve ar c'hloc'h o tifsal dre ar c'hoad, zoken ar gward.

Setu perak e tape gantañ kant ha kant prosez. D'ar gwellañ, gwech ebet n'o faee.

"Klevit, lo, Matelin, a lare eñ d'ar gward, trawalc'h e c'hourdrouzan, e tisplegan d'ar saout chom er prad pe er park ; met n'int ket evit sealeou ouzhin..."

- Skuizh, skuizh brein on gant ho tigerezioù. An taol-mañ e paect.

- Deuit da glask ul lomm sistr evelkent, ha me 'baeo."

Hag, evelse, o chopinat eurvezhioù a-bezh, Pier ne baeo netra. Neoazh un deiz, ar gward e fall imor, Pier a lare dezhañ :

"Hama, Matelin, me 'raio d'ar gwellañ. Memes buoc'h Penn-Ruz a zesko an hent d'ar re all. M'he gwerzho er sizhun a zeu e foar ar Motennoù.

- Mat ! Mat ! Me 'c'hortoz neuze."

A vintin mat, Pier en doa krapet d'ar Motennoù ha gwerzhet e vuoc'h Penn-Ruz. Hag eñ distroet d'ar gêr gant unanig brizh-du.

"Setu ma zraoù, Anna", emezañ d'e vaouez. "Ur vuoc'h eus al lanneier. Stummet eo da zebriñ treut. Homañ ne glasko ket kuitaat hor pradoù druz-ni.

- Ni welo, Pier, mar larit gwir !"

Antronoz e oa ar vuoc'h brizh-du o peurif diouzh prad ar c'hoad. Dot bras e oa al loen hag a vegadoù ledan e touze ar prad. Nag ur bam ! Ar re all a guitaas, evel bemdez, ar prad evit monet d'ar c'hoad. Hi, chom a reas e-kreiz ar prad.

"Mat-tre ! a soñje Pier. Honnezh a raio ma zraoù !"

Siwazh ! Ur sizhun goude, ar vuoc'h brizh-du a sailhe evel ar re all er c'hoadeg...

Brav-kaer e oa hag arnev en amzer. Ar c'helien a bike moj Brizh-du. Ha taol ha taol e teue un dabonenn vras da gornal en-dro dezhi. Ha pa ne oa mui nemet er prad e fardas holl ar c'helien warnezi...

Hag ar c'hoad a seblante astenn daveti e waskedenn hag e c'hlazadur. Brizh-du a droñs he lost, a red en-dro d'ar prad ha liant e sailh dreist ar c'hae.

Hag ar bugul da skroefjal truezek.

Pier, o labourat a-gostez a dosta da sikour anezhañ. Re ziwezhat ! Edo ar gward o tistreñ saout Pier d'ar prad.

"Ha ! Ha ! Ma labous, c'hwi 'lare ne vefe mui deut ho saout er c'hoad, ha setu hoc'h-hini, Brizh-du e-barzh ivez. Loened laer a zeu ganeoc'h bepred !

- War ho koar, Matelin, ma saout ne laeront ket.

- Ha, mallozh du, petra a reont-int neuze ?

- Klevet, an den, ma ya Brizh-du e-barzh, n'eo ket war he gwall eo, war hini ar bugul ne lavaran ket.

- Petra ? Petra ?

- Ar bugul ne oar nemet galleg Rohan ha Brizh-du nemet brezhoneg. N'int ket evit en em gompren."

(niverenn 51)

M. en UVEL

MARV MINOUR KERGO

Diaes eo tostaat da Gergo en noz-mañ dre an hentoù lous ha fall. Ha neoazh, daoust d'an noz tefival ha d'ar poullou fank, tud a glever o trapikellat dirak tachenn Job an Alieu, minour Kergo.

Taol ha taol ar c'hi a c'halv er porzh. Dor an ti a zo digor. Ar goulou a lugern war boulladoù dour al leur, hag un den pe ur vacuez a gemer lec'h 'barzh an ti. Seul gwech a teu e toull an nor ur vrumenn tommder ha moged, ha war un dro ganti, trouz pedennoù.

- Ez a ar minour da vervel, minour Kergo. Ar c'hozh paotr yaouank, danvez ha danvez dezhañ, ma zud kaezh."

Kement-se en deus brudet paotr al lizherioù war ar maezioù, ha setu en noz-mañ e gerentiad o tostaat d'ar minour hag oc'h erbediñ Doue d'hen diboaniañ...

Gant kreiznoz, an amezelen a guitaas an ti, hag an nized hag an nizezed a evezhas en-dro da Job o-unan. Kent pell, holl war-dro d'an tan, kafe ganto, ha skuizh war o fedennoù, int a gomz eus danvez ar minor o tegouezhout ouzh ar marv.

- An ti-mañ a jaoj din-me," a lar en nizez Matoch. "Tost eo d'ar vourc'h ha neoazh pell diouzh an trouz. Kent pell ec'h euredin nevez ha lojeiz a vo da glask.

- Park al Lann a raio ma zraoù-me," a respont an nizez Janton.

- Glustraj an ti ha parkeier an Hent a vo ma lodenn-me," a zistag o c'heniterv Brec'hed.

- O ! O !" eme an niz Jehann, "holl an traoù a vo gwerzhet ha rannet an arc'hant gant an noter.

- Foll oc'h evelkent, kenderv ! An hanter a yelo gant ar gouarnamant !...

- Kalz ne vern ! Gwerzh a vo !

Ha setu tabut ganto en-dro d'an oaled. Skrijadenn ha blejadeg viloc'h pe vil ; Gwashoc'h a vije bet sur a-walc'h p'en dije dalc'het c'hoazh ar minor ur sizhuniad all !

Met gant e eur diwezhañ e oa ha gant poan e sache e anal. C'hwez yen a zevere eus e dal war e zaoulagad. Mesket gant an daeroù, int a zevere en e vruch.

Hag evel ur c'houlaoenn dindan mervel hag a daol ur splannder kreffoc'h, evelse ivez ene ha spered ar minor a ziskouez spis dezhañ holl e vuhez.

Na poan evit armerzh ar moiand-se ! Dindan an heol, ar glav, an erc'h, e-kreiz an avel foll bemdez en devoa sentet ouzh boaz an douar. A-hed e vuhez en devoa gouzafvet evitañ. Holl e nerzh, holl e garantez a lakae gantañ evit hen drusaat, evit hen bravaat. Hag eñ, mouget en devoa holl e c'hoantoù all e kalon ar minor. Bremañ, staget war e wele, ne glev e mui nemet komz a lodennañ e dachenn, e zouar. Teurel e vallozh gant e gerent, o milligañ zoken, pe o skarzhañ a daol skubellenn, nag ur joa evitañ. Siwazh, ne savo, ne gomzo mui...

Daeroù c'hwerv a red war e fas krouzet d'al labour ha d'an amzer. E galon a bilas difonn, difonn. Un huanadenn hir ha setu ene Job o tarnijal betek ar Barner meur. Warc'hoazh e gorf a gemero lec'h e-kreiz ar pri en douar.

Diouzh an deiz, Matoch en ur tostaat da welout an eontr minor, hen c'havo-efi marv. "Tostait, emezi, tostait ! Marv eo ar minor an taol-mañ evelkent."

Hag an holl war ar bank da welout ha marv eo "evelkent" Job an Alieu, minor bras Kergo...

(niverenn 35)

YANN VRIANT

YUN AR C'HALVEZ

p'en em gavas ar c'hemener er mintinvezh-se er Gêrnevez, edo ar wreg oc'h aozañ lein. Lakaet he devoa krampouazh sec'h e-barzh ar skudilli ha soubenn da dommañ war an tan.

- Salud deoc'h, Gaid", eme ar c'hemener, sichant-tre dezhañ, en ur zont dreist an treuzoù.

- A ! Demat deoc'h, Yann", a respontas ar wreg yaouank. "N'emaoc'h ket diwezhat o tont d'ho tevezh hiziv. Ha kouezhet oc'h bet eus ho kwele 'ta p'emaoc'h war-sav d'an eur-mañ ?"

Klask a reas paotr e nadoz treñf ar gaouz, rak ne blije ket kalz dezhañ farserezh Gaid. E gwirionez, evel ar gemenerien all, e oa un den diegus, atav o terc'hel a-dreñv, hag aliesoc'h eget e dro da ziwezhañ o vont d'e zevezh.

- Sell 'ta !" emezañ en ur sellout ouzh ar peder skudell a oa war an daol-voued, "ne vin ket va-unan o tevezhiañ er gêr-mañ hiziv 'm eus aon ? Pa teuan davedoc'h, ne welan, peurvuiañ, nemet teir skudell war an daol : hoc'h hini, hini Tin ho kwaz ha va hini-me. Petra 'zo a nevez amañ hiziv 'ta ?"

Nevez dimezet e oa Tin ha Gaid. N'o devoa ket bugale c'hoazh hag o-unan e labourent o ziegzh hep kaout ezhomm eus mevel na matezh ebet rak ne oa ket bras o atant.

- Herve an Ti Gwenn", a lavaras Gaid. "a zo bet goulennet ganeomp da zont d'ober ur c'hastell-karr nevez ha lavaret en deus e vije deuet hiziv. E skudell an hini eo a zo aze war an daol e-kichen hor re-ni."

Un diaoul a zen e oa ar c'hemener ha natur fall a oa annañ. Pa c'halle ober droug n'eo ket vev e rae. Duzhpenn, kasoni en devoa kemeret ouzh ar c'halvez, n'ouzon ket war zigerez petra.

A-hend-all, yaouank e oa Gaid ha nebeut a skiant-prenet dezhi. Ma oa bet, pa oa plac'h yaouank, e breuriezha Bugale Mari, n'he devoa ket kavet c'hoazh an tu da vont e breuriezha Sant Tomaz, rak ken kredik e oa ha Yann Seitek e-unan.

- Paour kaezh merc'h, 'eme ar c'hemener d'ar wreg, "ne dalv ket ar boan deoc'h aozañ e lein da Herve an Ti Gwenn ; n'ouzoc'h ket 'ta emañ gouel Sant Jozef a-benn warc'hoazh. Derc'hent ar gouel-se e ra ar gilvizien yun ha vijil hag Herve a zo boazet da heuilh strizh al lezenn-se."

- Fei 'vat", a lavaras Gaid, "ne ouien ket an dra-se". Hag hi da denhañ skudell Herve diwar an daol.

Ur pennad goude e tigouezhas Herve e kêr. E-lec'h mont d'an ti e yeas, evel kustum, d'ober ur c'hrogad-labour d'ar c'harrdi da c'hortoz mare lein. Peurvuiañ ne veze ket dav dezhañ gortoz pell-bras. Dont a rae an ozhac'h pe ar wreg da lavarout dezhañ e veze ar pred war an daol.

En deiz-se avat, kaer en devoe gedal, ne zeuas den war e dro hag e rankas ober bouzellenn voan e-pad ar mintin. Un tammig kas a oa ennañ ha dizamant e lope gant e vailh war ar gizell evit ober trouz ha reiñ da c'houzout da dud an ti, en doare-se, edo oc'h ober kôfig moan.

War-dro unnek eur e teuas ar wreg d'ar c'harrdi :

- Un tamm rubanoù ha skolpoù am eus ezhomm" emezi, " da boazhat merenn."

- Sell 'ta !" a respontas Herve, "abaoc pe da vare eo deuet ar c'hiz er gêr-mañ da boazhat merenn a-raok aozañ lein ?

- Lein hon eus debret pell 'zo", eme C'haid "ha paneve d'ar c'hemener em bijs lakaet ac'hanoc'h marteze d'ober ur pec'hed. Lakaet em boa ur skudellad-voued evidoc'h war an daol, met Yann ar Veskenn en deus bet skiant a-walc'h da zigas din da soñj e rank ar gilvizien ober yun ha vijil derc'hent gouel Sant Josef."

Herve, pa glevas kement-se, a chomas e c'hensu war nav eur. Ouzhpenn souezhet e oa gant tro-gamm ar c'hemener. Droug ruz a yeas ennañ, met gant aon e vije bet grest goap outañ a kavas

gwelloc'h kuzhat war e gounnar.

- A ! Yann a zo deuet d'ober un devezh-gwriat deoc'h hiziv ?" eme ar c'halvez. "Mat, mat... O ! Un den a zoare eo Yann, avat, daoust d'an holl draoù diot a gonter diwar e benn.

- Traoù diot ?" a c'houlennas Gaid, savet-he skouarn ganti.

- Ya ! Diotachoù, kaozioù gwrac'hidi. An dud o deus teodoù fall, paour kaezh merc'h.

- Ha petra 'ta a laverer diwar-benn Yann ?

- O ! Nebeut a dra, nebeut a dra... Un tammig eo troet da vont d'ar merc'hed, c'hwil 'oar.

- Chê ! N'er boa ket klevet kement-se c'hoazh. Ne dalv ket ar boan kaout fiziañs e-barzh lod eus an dud memes tra ! Fei ! Brav emañ ganti avat ! N'eus nemedon en ti gant ar pemoc'h-se. Tin a zo aet da zouarañ avaloù-douar d'ar Saoul-Kerc'h. Petra 'rin ma teu ar c'hemener-laou-se da glask afer ouzhin ?

- O !" eme ar c'halvez, "n'ho po nemet bezañ war evezh outañ. War am eus klevet n'eo ket diaes gouzout pe da vare e teu e gu-lad dezhañ. Pa weloc'h ar c'hemener o lammat gant e zent ouzh e neud hag o strilhañ e benn, neuze e vo poent deoc'h diwall. N'ho po nemet bannañ ur geuneudenn ouzh e benn ha kerkent e wellaio dezhañ."

Mont a reas Gaid d'an ti gant he zavañcherad rubanoù ha skolpoù. E-ser meskañ he chidhouarnad yod kerc'h e taole a-gorn selloù truilhennek ouzh ar c'hemener. Hemañ a oa e-kreiz an daol-voued o pladorenniñ war e dorchenn. Mont a rae lijer e nadoz en-dro ha war e vuzell dan e pare ur mouc'hoarzh trenk ha goapaus. C'hoariet en devoa an "troad leue" d'ar c'halvez, brav ha kompenn, ha kement-se a rae dezhañ bezañ laouen evel un eostig.

- Pelloc'h 'zo deuet naon da Herve", emezañ. "Me 'zo sur ne chomo ket ar pouloud bremaik e toull e c'houzoug."

Hag e-ser lavarout ar c'homzoù-se -hifn ! hifn !- e lamme gant e zent ouzh e neudenn o klask he zrouc'hañ an tostañ 'r gwellañ d'ar mezher. Un neudenn vat a oa gantañ en e nadoz pe, marteze, e oa laosket e zent an e c'hanou. Ne voe ket evit trouc'hañ an tamm neud en taol kentañ. Hag en neuze, hep diskregiñ dioutañ, da strilhañ e benn an ur charoñsañ e zent.

Met Gaid a oa war evezh. " A ! Pitaouer", emezi d'ar c'hemener, "mañ ho kulad o tont deoc'h ? C'hwi, kennebeut ne chomo ket ar pouloud da waskañ war ho kalon ! Gortozit ma vezoc'h dizonet diouzh ho tech fall !"

Hag hi o tistagañ ur mell taol krog-yod dezhañ e-kreiz e veg ken na strinke ar yod tomm a bep tu.

- Forzh va buhez ! Forzh va buhez !" a hope ar paour kaezh kemener. "Houmañ eo kollet he skiant-vat ganti !"

Hag e tilmmas diwar an daol da glask tennañ ar c'hrog-yod digant ar wreg. "Tourc'h kozh !" emezi, "n'hoc'h eus ket bet a-walc'h ? Setu amañ un tamm all evidoc'h !" Hag an taolioù a gouezhe dizamant war chouk Yann ar Veskenn.

Hemañ, a c'hellit krediñ, ne chomas ket da gozhañ en ti. Ne voe ket pell o pakañ hed e c'har hag o skarzhañ er-maez. Treuziñ a reas ar porzh d'an daoulamm ruz, Gaid o vont war e lerc'h gant he c'hrog-yod.

Pa yajont e-biou d'ar c'harrdi e teuas ar c'halvez da hopal d'ar wreg : "Hep, Gaid !" emezañ o c'hoarzhin e walc'h, "ma rank ar gilvizien ober yun derc'hent gouel Sant Josef n'eo ket dav dezho, evelato, debrifiñ yod lesket d'o merenn. Arabat deoc'h leuskel ar yod da greienañ re !!!..."

(niverenn 9)

LENNIT

S K R I D

kelaouenn lennegel

rener : Gwendal Denez

18 niverenn embannet

Koumanant : 30 lur

CCP Denis I499-5I Rennes

pe : DENEZ , Ri , Ploare

29I00 Douarnenez

NEVEZ EMBANNET

gant AL LIAMM

D I O U G A N
G W E N C ' H L A N

d a n e v e l l

I44 pajenn

28 lur

40 lur war baper kaer

Gwerzh dre lizher : J. Queillé , 47 rue
Notre Dame , 22200 GUINGAMP
CCP II36 82 Rennes + 10% mizoù kas

HOR YEZH

kelacouenn savet gant Arzel EVEN

Koumanant : 40 lur evit peder niverenn , liesskrivet pe
voulet , 50 pajenn da nebeutañ e pep niverenn . Rener :
Per DENEZ . Sekretour : Yann DESBORDES , I place Ch.
Peguy , Poullbriant , 29 260 LESNEVEN . Bez e c'heller
paeañ ar c'houmanantoù dre gont-chek (RENNES , P. Denis
I499-5I) pe dre chek-bank (Per DENEZ , Ri , Ploare ,
29100 DOUARNENEZ) . Niverenn CPPAP : 51165. Embanna-
dur mareadek enrollet en ti-post . Liestennet gant
HOR YEZH . Diskleriet hervez lezenn : kentañ trimiziad
I979 . Merour : P. Denez . Pep gwir miret strizh

Niverenn I23
miz KERZU I978

priz an niverenn-mañ :
30 lur

